


DER



PEZH-CHOARI

EVIT AR



SKOL Nv. 24

oooooo
oooooo
oooooo

o
o
o
o
o
o
o
o
o
o

oooooo
oooooo
oooooo

o
o
o
o
o
o
o
o
o
o

oooooooooooooooooooooooooooooooooooo
Niverenn mae
Numéro : 24 mai 1964.
oooooooooooooooooooooooooooooooooooo

Dastumadenn a Gelennouriezh renet gant Armañs Ar C'halvez.
Priz ar C'houmanant da 4 niverenn : 12 lur.

PRIZ AN NIVERENN-MAN : 4 lur.

=====
oo
=====

Revue dirigée par l'Abbé Armand LE CALVEZ,
publiée sous les auspices de l'Association Bretonne d'Education
Nouvelle.

Prix de l'Abonnement à 4 numéros : 12 F.

PRIX DE CE NUMERO SPECIAL : 4 F.

C.C.P. Revue SKOL , LANNION, Côtes d'Armor, RENNES 1911 06.

=====
oo
oo
=====

Subscription to 4 issues : 12 Francs, about 18 shillings to be
sent to Barclays Bank, LLANRWST, WALES.

Renew your subscription as soon as possible and give notice to
the editor : Revue SKOL, Crec'h-Avel, LANNION, Côtes d'Armor,
BRITTANY.

=====
oo
=====

DEK PEZH - C'HOARI

EVIT AR SKOLIOU.

Ar golo a zo bet treset gant E.KERVELLA.

DASTUMAD "SKOL".

Niv. 1	: Ar C'hembraeg e Skolioù Kembre	3	lur
2	: Keleennadur ar Frizeg (diviet)	3	
3	: Douaroniezh Vreizh, gant A.Guildher	3	
4	: 300 Divinadell (diviet)	3	
5	: Rimadelloù hag Unangemoù	3	
6	: Kudennoù ar Skolioù er Slesvig	3	

RUMPAD NEVEZ .

Niv. 1	: Skol Sant Erwan (diviet)		
2	: Nebleg en Breizh, 4 Tezh-c'hoari gant Jarl Friel	5	lur
3	: Danevelloù diwar-juenn ar B.B. ha Skol Sant Erwan (diviet)		
4	: Kontadennoù Kozh ha Nevez, ul levr klok da gelearn ar yezh er gêr hag er skol, gant A.Ar C'halvez	7	lur
5	: Danevelloù a bep seurt	3	
6	: Deoù vloavezhiañ e Skol Sant Erwan	3	
7/8	: Krannlavarioù dastumet ha renket gant F.Kervella	6	
9	: Kanaouennoù Santel ha Komplidoù ar Sul, gant Maodez Glanndour	4	
10	: Ar C'hembraeg hag ar Skol, gant A.Ar C'halvez	5	
11	: Face au problème de la Culture dans la Bretagne d'aujourd'hui	4	
12	: Ar Brezhoneg er Skol	3	
13/14	: <u>AL LENNEGEZH VREZHONEK DRE AN TESTENNOU</u> , levrenn gentañ, 166 pajenn	8	
15	: Prizoniad ar C'haokaz, gant Tolstoj	3	
16	: Breizh hag ar Bed, pennaouù kelaouenn, gant Herve Kohan	4	
17/18	: <u>AL LENNEGEZH VREZHONEK</u> , eil levrenn, 163 pajenn	8	
19/20	: <u>EVLCHI'DENNOU WAR C'HERIADUR R.HEMON</u> , levrenn gentañ, gant F.Kervella, 113 pajenn	8	
21	: Mae 1963, Pennadoù a bep seurt	3	
22/23	: <u>EVREZHIADEMNCOU WAR C'HERIADUR R.HEMON</u> , eil levrenn	8	
24	: Dek pezh-c'hoari evit ar Skolioù	4	

AE GELAC'HENNIG WANIG & WENIG.

Koumanant-bloez da 6 niverenn skeudennet stank	3	lur
Albom 1961 dindan ur golo mollet	3	lur
Albom 1962 " " " "	3	lur
Albom 1963 " " " "	4	lur
An tri albom dre ar post	10	lur.
Kas an arc'hant da : Journal W & W, LANNION, C.C.F. Rennes 175 96.		
(niverennoù distag eus 1959 da 1960 : 0,50 Lur ar pezh)		

AR C'HOARIVA ER SKOL .

D'am soñj, ne vez ket graet implij a-walc'h eus ar c'hoariva en hor skolioù, izel hag etre, daoust d'ar gonidoù bras a c'hellfed tennañ, war dachenn an deskadurezh hag an desavadurezh, eus an arze ken naturel d'ar bugel.

I. Ar vugale hag ar c'hoariva.

Anavezout a ran ur paotrig, dezhañ seizh vloaz a-boan, hag a ijin kontadennoù dre skeudennoù hepken. An dud vras a zispleg trivliadoù o ene hag o menozioù gant gerioù, ar vugale a implij tresadennoù, livioù ha jestroù : setu perak ez eo ar c'hoariva un arz naturel evito.

Drevezañ a reont da gentañ darvoudoù gwelet pe bevet ganto : ur pred, ur veaj en tren pe ur weladenn war vor.

A-wechoù e klaskint ijinañ degouezhioù pe tud ha n'anavezont nemet dre glevout pe dre lenn : bez' e vo anezho brezelioù eus an amzer dremenet pe eus hon amzer, c'hoarioù cow-boyed... An hevelep tra, hep tamm kemma ebet, dre nerzh ar faltazi hepken, a vo ur c'hastell, ur lenez, ur c'hav pe ur blockhaus.

En em harpañ a zleer war an donezoù hag an ezhomme-se el liorzhoù-bugale, er skolioù hag er c'hlasoù-babiged evit deskiñ d'ar vugalegoù mestroniañ o jestroù diavaez, o zrivliadoù hag o faltazi. Arabat o rediañ, a-walc'h eo o fourvezañ gant an darveziou rekis: kanaouennoù, barzhonegoù, kontadennoù, taolennoù, diankachoù a bep seurt, kasedoù dilhad ha plas da c'hoari.

II. Ar c'hoariva er skol izel.

An doug-se d'ar c'hoari dre jestraouiñ, d'an dramatekaat, a c'hell bezañ implijet abred a-walc'h evel doare-keleenn ha ret eo e ziforc'hañ diouzh ar c'hoariva e-unan.

Pal an dramatekaat a zo diskouez an danvez keleennet en un doare bev ha plijus evit ma vo komprenet gwelloc'h ha dalchet soñj anezhañ. Pal ar c'hentelioù c'hoariva a zo barrekaat ar skoliad da sellout ouzh ar c'hoariva evel ouzh un arz; dre an oberoù savet gentañ hag oberoù ar re all e teuy a-benn war-dro 15 pe 16 vloaz da gompren penaos e saver, e krouer hag e c'hoarier pezhioù. Pal an dramatekaat a zo reiñ deskamant; hini ar c'hoariva a zo deskiñ tañ a ar gened.

Holl zanveziou ar skol izel hogos a c'hell ober e mañ eus an dramatekaat :

- ar yezh gentañ, dre sevel ha lenn pezhioù-choari;
- an eil yezh ivez, peogwir diwar ur rummad gerioù dibabet e c'heller ijinañ divizoù;
- an istor dreist-holl marteze, gant e zardvedoù diniver ha dishevel;
- an douaroniezh, zoken, da skouer da ziskouez penaos e vez levezonet an doareoù-bevañ gant an temz-amzer.

E-g'z ma woler, ledan eo an dachenn ha seür perak e vefe arabat implij an doare-keleñ-se gant an holl zanveziou war-un-dro. N'eus forzh penaos, gallout ar skoliad d'en em zisplegañ dre gomz hag e anaoudegezh eus e yezh eo a c'honezo e pep danvez.

Adalek bloavezh kentañ ar skol izel, e vo tu da zramatekaat met ret e vo gortoz ar c'hourr-kreñn, da lavarout eo an oad a 9 bloaz pe war-dro, evit klask c'hoari pezhioù berr, tennet eus an istor, ar bibl, ar c'hontadennoù, h.a.

Ar skoilh brasañ a c'hellfe dont eus ar mestr a glaskfe o lakaat da zrevezañ c'hoari ar re vras. Ret eo derc'hel kont eus stad emziasieg o spered, reiñ frankiz dezho hag o fourvezañ gant kement tra o deus ezhomma da reiñ lañs d'o faltazi.

Dramatekadur ha c'hoariva, an hini kentañ dreist-holl, o devo o flas er skol izel en abeg d'ar gonidoù a regasont diouzitu d'o heul d'an hent a zigoront.

II. Er skol-estre.

Psikologiezh ar bugel a gemm goustadik, hag e-doug an trede bloavezh er skol-estre hepken, war-dro 13, 14 bloaz, e tiskouezno bezañ disheñvel diouz hini ar skol izel. Al labour da seveniñ e-doug an daou vloaz kentañ a vo lamhenvel ivez ouzh hini ar skol izel.

Kenderc'hel a ray ar skol di d'aozañ pezhioù ha d'o c'hoari dirak o c'hlas pe glasoù all, ha tamm-ha-tamm e teuint a-benn da zeskiñ ar vicher a skrivagner hag a c'hoarier. Arabat dezho avat adverat pe zrevezañ hepken ar pezh o devo gwelet war o c'helaouennoù pe war skramm ar sinema, met dav e vo dezho klask an daveziou er o ski-ant-prenañ hag en o aergelc'h.

Neuze e c'hellint pleustriñ war bezhioù gwirion dre lenn ha dre c'hoari. Moarvat e vo lennet kalz kentoc'h dre zioner a amzar; arabat avat o lakaat da lenn hepken, ret eo o lakaat da c'hoari en gwirionez dre lenn dirak ar c'hlas a-bezh a vo goulennet digantañ barn. Er dcare-se hep'en e komprenint ster an diviz dramatek.

Ar c'hoari gwirion eo an talvoudusañ dre m'eo en a zegas ar muiañ a c'honidoù d'ar skolidi. Deskiñ a raint komz, distagañ fraez, en em zerc'hel dirak an dud, kenlabourat da seveniñ ur pal toutin, ha tro o devo d'anavezout holl c'hallusteroù o fersonelezh, pezh a roio fiziañs dezho enno o-unan.

Ha n'eo ket hepken an "dibabidi", ar c'hoarierien, a denno gonid eus ar c'hoariva, met ar c'hlas a-bezh.

A-raok dibab, e vo ret ober taolioù-ega ha pleustradegoù niverus evit ma vo gallet dizoleiñ donezonoù pep hini, o c'hreskiñ hag o ledanaat, hag o barn reizh.

Hag ouzhpenn, an holl skolidi war vetek nocent, a c'hellio reiñ dorn da brientiñ an dilhad, ar c'hinkladurioù ha marteze ar sal. Kement-se a c'hell bezañ sozet evl-just e-doug an eurioù gouestlet d'al labourioù-dorn; en ur skol renet mat ne vez ket a zisparti didreuzus etre an danveziou keletmet.

O skouezell a roint c'hoazh dez an a'adenn evit kuzulikat, rekati al leurenn, gwerzhan bilhedoù, madigoù hag evajoù, hag evit plasañ an arvesterien. Mar bez sentet ouzh an alich-se, e sello holl skolidi ar c'hlas, zoken ar re kondaanet da chom arvesterien hepmuiken, ouz ar pezh-c'hoari evel ouzh o zra hag e vo stardet al liammoù etrezo.

Met, ouzhpenn gonidoù a zeu da heul seurt embregadennoù, riskloù a zeu ivez.

Techet e vezer da lakaat ar berzh war gont ar c'hoarierien bennañ pe da varn ar berzh diouz niver ar gwenneien dastumet. Digarez a ro ivez da zarn da glask c'hoari dre lore'h hag ar mestr a c'hellfe bezañ techet ivez da ziskuez e ampartiz ha da silañ e venozioù er c'hoarierien.

Ret eo samañ ar riskloù-se ha klask o bihanaat, pe chom hep ober netra, pezh a vefe ur fazi.

Meur a hini a c'hellfe bezañ hamet ha digalonekaat war-un-dro gant an daolenn an eus livet eus arz ar c'hoariva e-diabarzh hag e-diavaez ar skol. Evit tizhout an holl baliou-se, ez eus ezhomm eus mistri arroutet-mat hag ampart war ar c'hoariva hag entanet ouzhpenn evit o micher a zesavourien. D'o stummañ e vefe ret kaout skolioù a-ratozh. Kement-se kem ebet n'eo ket un digarez evit chom digas ha dizoberiant. Dre forzh klask ha tastonat e teur a-benn da drec'hiñ war veur a skoilh.

Armañs Ar C'helvez.

Levrlennadur : Ministry Of Education.

The Arts in Education. DRAMA IN THE SCHOOLS OF WALES.

Y Celfyddydau mewn Addysg. Y DDrama yn Ysgolion Cymru.

London : Her Majesty's Stationary Office, 1954. Priz 3/6.

(U l levr a 80 pajenn en div yezh eabannet gant Ministre-rezh an deskadurezh en Londrez.)

CRIT HO C'HOARIVA MERC'HODENNOU.

N'eus kevrenn ebet eus hol lennegezh a ve pinvidikoc'h eget hor c'hoariva. Pezhioù-c'hoari e-leizh a zo bet savet e brezhoneg. Pezhioù-c'hoari a vez savet atav. Gwechall, avat, e veze displeget ar pezhioù-c'hoari. E-lec'h bremañ e chomont war ar paper.

Un deiz, spi am eus, hor bezo strolladoù c'hoarierien alarre. Un deiz, spi am eus, hor bo un Ti-C'hoariva Proadel. Un deiz, spi am eus, e welimp pezhioù-c'hoari brezhonek displeget war al leurenn, na diskouezet war skrammoù ar skinwel.

N'eo ket deut an deiz-se. Petra ober etretant ? Un den pe zaou a c'hell aozañ, e berr amzer, ur c'hoariva-merc'hodennoù.

Levrioù a zo (n'eus ket e brezhoneg, siwazh) da gelem deoc'h penaos en em gemer. Lod anezho a zo talvoudus. Hogen peurliesañ e roont re a alioù. Arabat deoc'h krediñ e rankit bezañ ken ampart ha renerien c'hoarivaoù-merc'hodennoù brudet Italia, Tehekoslovakia, h.a. Arabat deoc'h krediñ e rankit zoken kevezañ gant ar re a zo o micher diskouez c'hoarivaoù Gwignolig d'ar vugale.

Regiñ a c'hellit hep ober dispignoù bras.

Ar stern: Ur pezh-arrebeuri hir ha moan dirak ur voger, lec'h deoc'h da finval etrezo. Ur piano a zo dispar. Hogen kasedoù renket war un daol hir a c'hellit implijout ivez. Ret kaout strezoc'h hag an arvesterien un dra bennak gouest da guzhat ac'hanoc'h, uhel-mat (1,50 m da skouer), ha start.

Ar goulou: Ho merc'hodennoù a renk bezañ sklerijennet -mat.

Ar merc'hodennoù : Merc'hodennoù eus ar seurt a zouger war an dorn e-giz manezoù a zo ar re aesañ. Va ali-me (kontrol d'an ali a roer neu vuiañ) eo prenañ anezho en ur stal c'hoarielloù. Hogen grit hoc'h-unan ar gwiskamantoù gant pilhoù.

Ar c'hinpladur : Ar voger a-dreñv, ma n'eo ket unliv, a vo golc'et gant un tamm lien pe gotoñs, louet pe arvelen. N'eus ket ezhomm a ginpladur peurliesañ. Traoù eo a ra ar c'hinpladur efedusañ mar bez ret : tammoù koad pe gartoñs, glasvez, h.a., staget-start (aes da stagañ ha da zistagañ koulskoude). Diwallit avat da vezañ stroballet ganto en ur vont ha d'out hag en ur lakaat ho merc'hodennoù da finval.

Ar pezhioù-c'hoari : N'eus ket ezhomm da vezañ skrivet diaraok. Ur fakter a zo a-walc'h. Ur mar ailh-pobl a c'hellit displegañ, da skouer. Mar fell deoc'h displegañ ur pezh-c'hoari skrivet, n'ho pet ket eon da gemmañ, da droc'hañ pennadoù 'zo, da asenn pennadoù all. Ar pezhioù-c'hoari merc'hodennoù a die bezañ buhezek, leun a fiñv hag a drouz.

o - o

Er c'helc'hioù, er skolioù, e c'hell ar c'hoariva-merc'hodennoù ober muioc'h a varzh ha dougen muioc'h a frouezh ege' kalz a zidumantoù all. Implij bras a vez gant anezho e broioù 'zo.

Perak ne vefe ket e Breizh ?

Roparz Hemon.

Adembannet gant eotre hegarat an aozer diwar Ar Bed Keltiek, niv.51, miz meurzh 1963, pajenn 44.

DEIZ KENTAN AR SKOL

gant ERWAN KERVELLA.

C'hoarierien : an daneveller,
ar mestr-skol,
Yann Chikolodenn,
Ivonig Kerarkou, lesanvet "Loustig",
Bernarz Sivilizet, mab ar maer,
Yann Chikolodenn,
Erwan Kerstoupiq,
Pêr Chapel, ha me 'oar-me

v-v

Denev. Setu ! Kroget eo ar skol...

Savet abred mat, holl vugale Landibido a zo degouezhet er c'hlas.

Ya... Holl vugale Landibido a zo aze :

Bernarz Sivilizet, mab ar maer,

Yann Chikolodenn,

Erwan Kerstoupiq,

Pêr Chapel, ha me 'oar-me

Ar baotred a sav en o sav pa lavarer o anv.

Bez' emañ zoken er c'hlas Ivonig Kerarkou, lesanvet "Loustig".

Souezhet-bras eo an holl rak ar bloaz a-raok ne rae nemet

skol-louarn ha lavaret he doa he vamm ne dafe mui d'ar skol.

Ar skolaer a c'houlenn o anvioù digant ar baotred :

Mestr.- Piv a grog e anv dre A, B, C ?

Y.Chi.- Me.

Mestr.- Mat. Hoc'h anv-badez ?

Y.Chi.- Yann.

Mestr.- Mat. Hoc'h anv-familh ?

Y.Chi.- Chikolodenn.

Mestr.- Deiz ha bloaz ho kanedigezh ?

Y.Chi.- Naontek a viz meurzh mil nav c'hant nav ha d'acu-ugent.

Mestr.- Micher ho tad ?

Y.Chi.- Ober a ra war-dro sivi, piz, kokombrez...

Mestr.- Mat. Liorzher eo 'ta. Pet bugel er familh ?

Y.Chi.- Tri. Div blac'h ha me.

Mestr.- Mat-tre, azezit.

Ar skolaer a lavar goustadik l al lizherennoù all : D.E.F. G.

E.I.J. Ar vugale a chor mut. Kroget ho divrec'h ganto.

Mestr.- K.

Loustig a sav e viz.

Mestr.- Hoc'h anv-badez ?

Loust.- Loust.g.

C'hoarzhadeg er c'hlas.

Mestr.- N'eo ket al les-liv a c'houlennek met an anv-badez gwirion.

Loust.- 'Vel ma faeron : Ivonig.

Mestr.- A, mat. Hoc'h anv-familh bremañ.

Loust.- 'Vel va zad, va zad-kozh, va zad-kuñv ha va zad-you !

Mestr.- Lavarit hoc'h anv 'ta buan !

Loust.- War bez va zad-kozh eo skrivet, Aotrou !

Mestr.- Na rit ket goap eus an dud, mar plij !

C'hoarzhadeg er c'hlas.

Loust.- Mat ! Kerankou.

Mestr.- Kerankou ! Mat ! Deiz ho kanedigezh ?

Loust.- N'ouzont ket me ! Unan eus devezhioù ar sizhun moarvat !

Mestr.- 'M eus ket goulennet se ! Goulennet em eus an dra-mañ : an deiz, - ar c'hentañ, da skouer - , ar miz hag ar bloaz. Komprenet hoc'h eus ?

Loust.- Diouzh klevout va mamm ez on ganet tri devezh goude m'en doa gounezet va zad ar c'honkour boullou ! An dra-se a c'hoarvezas goude an eost.

Pevar bloaz ec'h on koshoc'h eget "Charlig", koshañ pemoc'h ar vereuri, ha ...

Mestr.- Derc'hel' reot d'ober goap eus an dud, c'hwi ?

Sivil.- Aotrou Skolaer, me 'oar bloavezh e c'hanedigezh.

Mestr.- Komzit, Bernarz, c'hwi da vihanañ a zo ur bugel seven. Lava raut a rin se d'an Aotrou Maer.

Sivil.- Unan ha tregont a viz eost, er bloaz naontek kant hanter kant.

Mestr.- Petra 'ra ho tad, Ivonig Kerankou ?

Loust.- Boueta saout, moc'h, kezeg. Treiñ 'n douar, plantañ ha hadañ a bep seurt e-barzh. Krial a ra c'hoazh evel ur vuoc'h war mammig ha bazhata ac'hanon.

Mestr.- Met.... eus pelec'h e teu ar ibil-mañ ?

Loust.- Me ?.... eus ar gêr evel just !

C'hoarzhadeg er c'hlas. Diversañ a ra an dour zoken war daoula-gad ar baotred.

Ar mestr a zo nervernek.... mall en deus, anat eo, da echuiñ gant ivonig Kerankou.

Mestr.- Pet bugel a zo er familh ?

Loust.- Seizh war-nugent(C'hoarzhadeg) ya, ya, gant bugale va zintined ha...

Mestr.- Met pet a zo er gêr du-se ?

Loust.- Trizek.

Mestr.- Petra ?

Loust.- Ya, trizek, peogwir daou eus va zontoned a zo o chom ganeomp.

Mestr.- Mat. Bez' emañ da dad, da vamm, te ha....

Loust.- Loullig ar c'hi...ha Bisig ar c'hazh.

Ar skolaer, droug ennañ, ruz e benn, e zaoula-gad er-maez eus e las, e c'hencou a-dreuz, a grias : (1)

Mestr.- Azezit buan !

Loust.- Ouf ! (en ur azezañ war ar bank)

Mestr.- Ouf !(hag ur pennadig goude) Kendalc'homp gant al li-zherenn M.

C'hoarzhadeg hir gant an holl skolidi.

Erwan KERVELLA, here 1963.

ganet d'ar 15 a viz eost 1949.

1) al linenn-mañ a c'hell bezañ lennet gant an displeger.

MONT-DONT D'AL LOAR.

gant Erwan KERVELLA. (1)

C'hoarierien: an displeger,
Ronan,
Malo,
Un dinosor, ul loen o chom war al loar,
Zotcyo, un "den" o chom war al loar.

Kentañ Arvest.

Displ. -Ur wech e oa daou sod...O anvioù a oa Malo ha Ronan. Ronan en doa c'hoant da vont da welout an diaouled ha Malo de vont da welout tud al loar. Un dro bennak en em lakajont da d'abital.

Ronan. -arc'hoazh e vin gant an diaouled o tafsial...

Malo. -N'out ket sot ? Gwelloc'h eo mont d'al loar; eno ez eus tud ha na anavezomp ket.

Ronan. -An diaouled n'anavezomp ket kennebeut.

Malo. -Gwelloc'h eo mont d'al loar, pa lavaran dit, ha warc'hoazh e krogin d'ober ur fuzeenn gant an holl draoù a zo en ti.

Ronan. -N'eus ket peadra d'ober ur fuzeenn gant a. traoù a zo en ti du-se, ha neuze, gwelloc'h eo mont da welout an diaouled: ganto da vihanañ e vimp tommet...

Malo. -Ye da ! Marteze e vimp tommet, ha gwashoc'h c'hoazh : lakaet da virviñ ha me 'oar-me ! ..Gwelloc'h eo mont d'al loar, pa lavaran dit, fidemoustik !

Ronan. -Me ' lavar dit eo gwelloc'h mont da welout an diaouled Ha mont a ran.

Malo. -Gortoz un tamm bihan, kozh poufer ! N'i ket kuit evel-se....

Ronan. -Ha perak ne dafen ket ? kozh touseg !...

(en em gannañ a ra an daou vignon.)

Eil Arvest.

Displ. -D'an noz en em lakaas Ronan da bediñ an diaouled da zont d'e gerc'hat... Met pa welas anezho o tont e krogas ur barrad spont emañ...ken na dec'has kuit, herrdañ m'hellas, evit don da gaout Malo.

Ronan. -Va Doue benniget deuit d'am sikour..Emañ an diaouled o redek war va lerc'h.O O O Nann, nann Penaos ? Dija ? Nann, nann... Malo ! Malo ! Forzh va buhez ! Skoazell din !

Malo. -Petra ' zo degouezhet ? Emañ an diaouled war da lerc'h ? Met, ne oas ket o klask gwelout anezho ? Ha bremañ e tec'hez kuit dirak o skeud ! N'em boa ket lavaret dit : gwelloc'h eo mont d'al loar

1) Embannet evit ar wech kentañ war WANIG HA WENIG, Nn 6, meurzh 1960.

Ronan. - Ya, ya, evel ma karez.. Krediñ a ran ac'hanout a-walc'h... Gwelloc'h eo mont d'al loar...met..heu...

Malo. -Perak "met,heu,heu,heu " ? Petra ' oas o vont da lavarout ?

Ronan. -Netra, netra pa lavaran dit.

Malo. -Ac'hanta, kae da sutal, genaoueg, gant da netraoù ! Prestik e vo echu va fuzeenn hag ez an d'ober war he zro e-lec'h chom da goll amzer ganit. A-benn arc'hoazh e c'helli marteze disac'heñ ar pezh a zo war da galon...Kenavo.

Ronan. -Ma, kae 'ta war-raok, penn sot !

Trede Arvest.

Displ. -E-pad an noz e klask Malo lakaat ke flusker ar fuzeenn da vont war raok.

Malo. -N'a ket ar c'heflusker war-raok, 'm eus aon..A ! setu bremañ e tro..War-raok etrezek al loar...Emañ e-kreiz an oabl...He weler netra nemet koumoul..Sell 'ta un tamm douar bihan o nijal en aer... Tostaat a ran...Setu al loar...

Setu-me degouezhet war al loar...Diskennomp.

(Ober a ra jestroù ha leuskel a ra kriadennoù da ziskouez e levenez hag e loa.)

Kemer a ran va c'harabinenn : marteze em bo ezhom d'an em zifenn. (Stonkañ a ra.) N'on mui kab da... aer din...buan buan d'ar fuzeenn da gerc'hat oksigen...buan.

Gwelloc'h ec'h a bremañ. Mont a ran d'ober un droig da welout petra ' gaver war al loar-mañ. O ! O ! O ! un dinosor .. Buan va c'harabinenn.

Dinos. -Je je je je gr gr gr. Matilin eo va anv.

Malo. -Va anv-me a zo Ma...

Dinos. -Matilin ivez ? A ! A ! A !

Malo. -Nann, nann. Malo.

Dinos. -Heu, heu ...Ne gomprenan ket.

Malo. -Me ' lavar dit eo Malo va anv. Ha petra ' rez emañ ?

Dinos. -Petra ' ran emañ ? Kanañ evel just !

Malo. -Petra a ganez ?

<u>Dinos.</u> -Me eo Matilin an Dall Ar bombarder laouen A lak an dud da zañsal Diwar va barrikenn.	Un taol sut ha souden Paotred skañv d'an abadenn Ur bomm sonn ha raktal Paotred o fringal. gè !
--	--

Malo. - Ha petra c'hoazh ?

<u>Dinos.</u> -T'eus ket gwelet Champi 'Tiskenn an Dourdu E roched 'r-maez e vragou Dibrenn an daou du.	Ha me lavaret dezhañ: Deus emañ, Champi gaezh, Ma prennin dit da vragou, Da roched' zo er-maez.
--	--

Malo. -Gouzout ' rez c'hoazh traoù all ?

Dinos. -Ya 'vel just, met poent eo dit mont kuit. Kenavo.

Ya zalc'h da vale ha da sellout en-dro dezhañ.)

Malo. - O ! setu tud ! ...tud al loar, biskoazh kemend-all !

(Uman eus tud al loar a dosta.)

Zotoy. - Mitosito fatisos... sipolotem... dabamiti ...fatite...
Gleu...gleu...gleu...

Malo. - Salud deoc'h ! Hag un anv bennak hoc'h eus ?

Zotoy. - Zotoyo eo va anv.

(Ar re all, e-giz kornandoned, o deus c'hoariet an dro da Valo
en ur c'hourlammat ha, war ur lestr eus Zotoyo, e redont kuit.)

Malo. - Choc a rez da gomz ganin ? C'hoant ac'h eus d'ober anaoudegozh
ganin, hañ, Zotoyo ?

Zotoy. - yo.

Malo. - Yo ! kement-se a dalvez kement a Ya, sur a-walc'h.
Ha dont a rez ganin da welout va fuzeenn ?

Zotoy. - Petra eo se ur fuzeenn ?

Malo. - Ur fuzeenn a zo un ardivink ijinnet evit mont pell-pell en aer,
da vale stre arblanedennou..Ha me ' zo o tont eus Breizh.

(Un trouz spontus a glever. Malo ha Zotoyo a horell, a gizezh
zoken war an "douar", a ruilh hag a dap adsevel.)

Zotoy. - Emañ al loar o vont da gouezhañ war ar blanedenn Veurzh.

(Tec'hout a ra kuit.)

Malo. -- Buan ! buan ! d'ar fuzeenn.

(Levout a reer trouz ar fuzeenn o loc'hañ.)

Pcent eo din tec'hout, = gredan.

(Sellout a ra war-draoñ.)

Bremañ en em gavan 1 000 kilometrad eus an douar....

500	"	"	"	"
200	"	"	"	"
100	"	"	"	"
50	"	"	"	"

A ! Diwallomp ! (Trouz) Ha setu-me a-nevez war an douar...hep
re a boan..Ya, met pelec'h ec'h on ? Sell 'ta ! me ' gav din
ec'h anavez an terouer-mañ... N'eo ket ti Ronan a zo aze ?
Eo, 'm eus aon. Ronan, Ronan !

Ronan. - Petra ' zo ?

Malo. - Ronan ! Me eo ! Me, Malo, o tistreiñ eus al loar.

Ronan. - Dija ! Ma, n'out ket bet pell oc'h ober da dro. N'ec'h eus ket
bet kalz a anzer da welout an traoù...na da ober anaoudegozh
gant tud al loar evel m'ez pos c'hpant !

Malo. - Ac'hanta ! 'n em dromplañ ' rez ! Tud an eus gwelet ha, ha,
penevet d'un dra spontus, al loar o kouezhañ war ar blanedenn
Veurzh, e vefe deut va mignon Zotoyo ganin war an douar.

N'eus forzh ! bet'c'h on war an Loar...Ha kement-se 'c'h on
d'embann dre holl ha da gontañ d'an roll....

- 6 -

Ievare Arvest.

Displ. - An deiz warlerc'h e tispag Malo "Ouest-France" gant lorc'h.

Malo. - Ac'han ! gouzout a raen e vije bet embannet an nevezinti...
Setu-me bremañ un den brudet ! Malo, an hini a zo bet war al
Loar ! A ! A ! A !

(Ronan a dremen hep komz na sellout outañ.)

Hola ! Te ' zo aze ? Ne saludez ket ac'hanon ?... Ha va saludiñ
gant enor ha doujañs, mar plij ! Me eo an Hini a zo bet war al
Loar. N'ec'h eus ket lennet se war "Ouest-France" ?

Ronan. - Marteze, met n'em eus ket graet van...traoù all a zo war va
spered...N'ec'h eus ket gwelet "Ouest-France" ?

Malo. - Petra ?

(Ronan a ro dezhañ ar gelaouenn en ur ziskouez ur pennad;
Malo a lenn :)

" Ronan en deus dizoloet teñzor al Luduaned".
Hola 'vat ! Ro din diouzhtu an teñzor-se. Gant an arc'hant e
vo tu d'ober fuzeennou all da vont da vale en aer c'hoazh...
da welout pelec'h emañ al loar bremañ....ha Zotoyo.

Ronan. - N'out ket sot ! ..Kredif a rez ec'h an da reif va señzor dit
evel-se ?... Pella ac'han, ha diouzhtu pe ez po ganin....

(Prest eo da skeiñ warnañ.)

Malo. - Ho 'vat ! 'Vel-se 'mañ kont amañ ? Gwelout mat ' ran n'eus ne-
met sach ha reuz da gaout war an tamm douar-mañ. Gwelloc'h eo
din distreiñ d'al Loar...eno ec'h eo jentiloc'h an dud !

ooooo
ooo
o

Erwan KERVELLA, meurzh 1960.

- 7 -

A R C'H L O C'H E R H A G A N D I A O U L .

Gant ar Gontez de Rohan-Chabot.

C'hoarierien : an displeger,
Santez Anna,
Anton, ar c'hloc'her,
An Aotrou Person,
an Diaoul.

Kentañ Arvest.

Displ.-Gwechall gozh e veve e Breizh-Izel ur soner oadet ha kabac'h, taget e izili gant ar rann.
Gwall ziaes e oa evitañ pignat betek barr tour an iliz evit sachañ war gordenn ar c'hloc'h.
Soñjal a rae gant anken en devezh, tost a-walc'h, ha vefe ret dezhañ lezel e garg gant un den yaouankoc'h.
Un deiz ma oa chalet muioc'h eget boaz, e teuas devetañ un den kornek ha forc'hek e dreid.

Diaou.-Da ce vad klemm e-giz-se, Anton gozh ? Selaou mat ouzhin kentoc'h. Me 'zo ba rrek da reiñ dit en-dro nerzh da yaouankiz. Ne c'houlennan evit se nemet un dra dister: kenderc'hel a ri da seniñ evel a-raok an oferinier hag ar gouspereler; evit pezh a sell ouzh ar perrest avat, ma eo an hini a sono bep eil gwech.

Displ.-Anton gozh ne brederias ket pell. Koll a reas e dammig spered o soñjal adkavout e nerzh a-wechall...Hag ouzhpenn se, ne c'houlennan ket an diaoul kalz a dra, na petra 'ta ?

Soner.-Hag e c'hell kement-se bezañ gwir ?

Diaou.-Evel just, pa lavaran dit !

Soner.-Ma ! a-du on neuze. Trugarez bras !

Displ.-Dreñ d'an arpoent e oa ret seniñ evit ur vadeziant. Anton goz ne reas nemet ul lamm betek lein an tour, hag e tiskennas ken aes all, leun e galen a levenez.

Eil Arvest.

Displ.-Antronoz avat e oa ret seniñ evit interamant un den pinvidik. E tour an iliz en em gavas Anton gozh tal ouzh tal gant an Diaoul. Hervez ar marc'had e oa e dro da seniñ.
Siwazh ! e-lec'h ton gorrek kloc'h an anaon, e voe klevet un ton joañs ha sartik.

Soner.-Faziañ 'rez ! Chom a-sav 'ta ! N'eo ket ur vadeziant, un interamant an hini eo !

Diaou.-Da afer-te eo pe va hini ?.....
Setu komper ! da dro a vo ar wech all !

(Kuit ez a an diaoul. Antreal a ra an Aotrou Person.)

Perso.-Anton gozh, deuit d'ober ur pennad hent ganin. Un dra a-bouez am eus da larout deoc'h.

Petra 'zo c'hoarvezet ganeoc'h ar mintin-mañ ? Gout a ouzoc'h ervat...Evit interamant an Aotrou Lagadeg hoc'h eus

sonet un ton lirzhin, ma oa ur vezh e glevout ! Daoust ha kollet ho poa ho spered ? pe e oa graet ganeoc'h ...
Respontit ...

Soner.-Aotrou person, n'ouzon ket...Krediñ a rafan a-walc'h en boa klouket un nebeut en tu-hont d'am gwalc'h.

Perso.-Ma ! Pec'hed anzavet, pec'hed hanter bardonet. Hogen, gouzout a rit mat n'hell ket padout evel-se. Ra vezo an taol kentañ hag an hini diwezhañ !

Soner.-Ya, Aotrou Person !

Trede Arvest.

Displ.-Ar wech warlerc'h e oa tro ar soner d'ober e vicher hag ez eas mat an traoù. Klafv e oa koulskoude Anton gozh o soñjal en eured a zlee bezañ lidet antronoz.

Hag e lakaas en e benn c'hoari un dro gamm d'an diaoul.

(An Diaoul a zeu tre.)

Soner.-(teñval e benn.) A ! Setu hep mar deiz gwashañ va buhez. Morse n'em bije kredet e vije marvet ar c'halvez, va mignon bras, e-kreiz e yaouankiz...

Diaou.-Diwar-benn piv a gomzez ?

Soner.-Diwar-benn ar c'halvez paour a vo interet arc'hoazh hag e oa va gwellañ mignon. Siwazh din !

Diaou.-(en ur c'hoarzhin.) A ! A ! A ! Ober a rin va seizh gwellañ evit ho frealziñ, te hag ar familh.

Displ.-Antronoz edo Anton gozh war c'hed, hag e klevas gant frealzidigezh an ton joañs sonet gant an diaoul evit an eured.
Kompren a reas, mat re ziwezhat, e oa bet toulllet gant Anton.

Displ.-Kentañ gwech ma adwelas ar soner, un aer joañs warnañ, e soñjas :

Diaou.-Tamm lakepod 'ta ! Ne vin ket paket diy wech ! Kaer az po c'hoari, e sonin kentañ tro un ton joañs !

Displ.-Paket e voe koulskoude : ret e oa seniñ evit ur vadeziant ! Met gwall ziaes e oa kenderc'hel da drec'hiñ war an diaoul, a zo fin-kenañ, evel ma oar an holl dud.

Gwall enkrezet e oa an paour-kaezh soner. Ober a reas e venoz mont da bediñ an Itron Santez Anna.

Anna.-N'eo ket brav ar pezh ac'h eus graet. Bleud an diaoul n'hell bezañ nemet brenn. Ret eo gouzout koshaat hervel Youl an Aotrou Doue.

Soner.-Prest on da adkemer va rann ha va c'hozhni, gant ma vin pardonet ha dieubet diouzh dalc'h an diaoul.

Anna.-Mat, pardonet e vi. Kemer bremañ dour benniget, kas da c'hlebiañ kordenn ar c'hloc'h ha bez e peoc'h.

Soner.-Trugarez ! Santez Anna.

(Steuziañ a ra Sentez Anna. Mont a ra ar soner da c'hlebiañ kordenn ar c'hloc'h.)

Tad. - (o redek.) An tan ! An tan !

(An diaoul a red d'ar c'hloc'h. Tapout a ra krog er gordenn. Tomm-berv eo ha n'hell ket an diaoul diskregiñ diouti keer en deus en em zifretañ.)

Displ. - Devet e zacuarn dezhañ, e ruilh an diaoul eus lein an tour betek kreiz ar blasenn. Kemmet eo bremañ en ur pezh maen du a c'heller gwelout eno c'hoazh.

EURED AL LOGODENN .

gant YOUENN AN OLIER.

C'hoarierien : An Tad Logodenn,
ar Verc'h Logodenn,
Ar C'hazh,
al Louarn.

Diviz kentañ etre an Tad, ar Verc'h, ar C'hazh.

Tad. - Testait va bugale, ma c'hellin lavarout deoc'h ur c'heloù mat.

Merc. - Ur c'heloù mat, Tad ?

Tad. - Ya. Graet em eus va menoz dimeziñ ac'hanout, va merc'h.

Merc. - Da...da...da...zi...meziñ ac'h...

Tad. - anout. Ya, va merc'h.

Merc. - Ha gant piv, va zad ?

Tad. - Gant an aotrou Raminagrobis a zo amañ.

Kazh. - Ya, dimezell. Me 'm eus an enor da vezañ bet dibabet gant ho tad.

Tad. - Eürus e vi gantañ peogwir ez eo pinvidik-mor.

Merc. - Met ne fell ket din dimeziñ, Tad, ne fell ket din !

Tad. - Penaos ? Ne fell ket dit ? Ma c'hourc'hemmen e senti !

Eil diviz etre ar Verc'h hag al Louarn.

Merc. - Karedig ! A ! Karedig ! Ma oufes pebezh keloù fall. Hi ! hi ! hi ! Va Zad a fell dezhañ va dimeziñ ! Hi ! hi ! hi ! Gant ar C'hazh peogwir ez eo pinvidik !

Loua. - Petra a glevan ! Dacust ha posubl eo ! A ! Ma c'hellfen diskuez dezhañ va acur, sur, e kemefe e venoz, rak a-hend-all ne fello ket dezhañ va c'hrediñ.

Merc. - Penaos ? Pinvidik out ?

Loua. - Ya. Poent eo din displegañ dit penaos emañ an traoù. N'on ket ul louarn. Ur stumm faos n'eo ken, ur stumm faos bet lakaet war-non dre un taol scserezh.

Merc. - Penaos ? Petra out neuze ?

Loua. - Ur gozh wrac'h fall he deus va jordet, va rediet da zogen stumm kasas ul louarn. Evit gwir ez on...ul logodenn !

Merc. - (Strafuilhet) Ul logodenn ! Setu perak em eus gelllet da garout, dacust pegen iskis e oa !

Loua. - Eürus e vi ganin pa vin aet da logodenn adarre.

Merc. - Pegoulz e c'hoarvezo an dra-se ?

Loua. - E-pad ugent vloaz hag un devezh e tlean chom louarn. Warc'hoazh ez echuc va finijenn. Setu perak hel lavaran dit bremañ. A-hend-all n'em befe ket kredet rannañ ger diwar-benn va c'harantez. Warc'hoazh e vin logodenn adarre.

Merc. - Pebezh joa ! Nag e vin eürus !

Loua. - Warc'hoazh e vimp euredet, va c'haredig !

Merc. - Ya. Met petra a lavaro va Zad ?

Loua. - Chom hep sentif betek warc'hoazh. Evit ar peurrest, va lez d' ober !

Trede diviz etre an Tad, ar Verc'h hag al Louarn.

Tad. - Neuze, va merc'h, ha prederiet ec'h eus ? Daoust ha fur out bremañ ? Prest eo Raminagrobis hag a-benn ur pennad e teuo d'as kerc'hat.

Merc. - O Tad ! Ne zimezin ket gant ur c'hazh ! Sur a-walc'h e tebro ac'hanc'h un deiz bennak.

Tad. - Hopala ! Raminagrobis n'eo ket ur c'hazh evel ar re all. Ur c'hazh desavet-mat eo; morse ne da da logota: mezh en dije ! Ur bein arc'hat en deus; debriñ a ra dienn dous, gwastell a bep seurt, chokolad evel un den a renk uhel ! Eürus e vi gantañ, m'hel lavar dit. Kae d'en em ficsañ brav evit e zegemer !

Merc. - Ne rin ket !

Tad. - Gri ! pa lavaran dit !

Merc. - Mann ! Ne rin ket ! Sikour din ! Forzh va buhez !

Loua. - Emaoc'n a vont da lezel va logodennig pe e vo fall ar foenn ganin.

Tad. - Al louarn bremañ ! Setu un afer all ! Kae kuit, loen fall ! Se ne sell ket ouzhit !

Loua. - Me eo an hini a zimezo gant ho merc'h !

Tad. - Petra ? Sot out ?

Merc. - Ya, ma zad, dimeziñ a rin gantañ. Al louarn-mañ n'eo ket ur gwir louarn !

Tad. - Hi ! hi ! hi ! Petra eo neuze ? ur balun ? Hi ! hi ! hi !

Loua. - N'on ket ul louarn met ul logodenn cheñchet e louarn gant ur gozh wrac'h fall evit ugent vloaz hag un devezh. Kuzhet em boa un teñsor e-barzh va zoull... met abaoe m'on bet troet e louarn n'hellan mui mont da dapout anezhañ : re dev ez on levit mont en toull !

Tad. - Ha ! ha ! ha ! Ya ! brav eo da goñchenn met ne gredan ket da sorc'hennoù ! Gwelout a ran n'out nemet ur c'hozh louarn sot a-walc'h evit soñjal e kredin e sotonioù !

Merc. - Eo, Tad. Ul logodenn eo e gwirionez.

Trede diviz etre an Tad, ar Verc'h, al Louarn, ar C'hazh.

Kazh. - (oc'h erruout) Dont a ran da gerc'hat va d'nevez-pried. Prest oc'h, mignonig ? Deuit a-benn ar fin !

Merc. - N'in ket ! Chom a rin gant al Lou... O !

(Al Louarn a dro da logodenn)

O'hwi ! wel, Tad, e oa gwir ar pezh a lavare !

Kazh. - Pennaos ! Ul logodenn ! Tanfoeltr !

(Klask a ra tapout al logodenn nevez; houmañ avat a lamm en toull.)

Merc. - Sellit, Tad ! Gouzout a ra c'hoazh logota ! Aon am eus !
Ma timezfen gantañ e vefen paket deiz pe zeiz !

Kazh. - (mezhek) N'em eus ket graet a-ratozh ! Ne rin ket mui ! Feiz Raminagrobis !

(Tostaat a ra ouzh an Tad hag a-daol-trumm e lamm warnañ.)

A ! A ! A ! N'em eus ket bet egile, met hemañ am bo da vihanañ !

Merc. - Hi ! hi ! hi ! Paour-kaezh Tad ! Lazhet en deus anezhañ !

(Ar C'hazh a zo set kuit dre un tu eus ar c'hoariva en ur ges gantañ en Tad merv. An danvez pried a zeu en-dro dre an tu all. Kregiñ a ra e dorn al logodenn.)

Loua. - Na ouel ken, karedig. N'hellomp ken ober netra evit da Dad. Deus ganin e-barzh va zoull; eürus e vimp hon-daouig.

(E-pad ma tsikenn ar ouel, e saludont o-dacu a-gevret an arves-terien.)

(Ar pezhig-mañ a zo bet c'hoariet evit ar wech kentañ e beilhadeg Kelc'h Sevenadurel Brezhonek Roazhon d'ar 27 ebrel 1963.)

PERIG HA GWIGNOLIG

Kan jestrourset evit bugaligoù gant Roparz HEMON.

C'hoarierien: Pêrig,
Gwignolig,
Gwignola,
Perina.

(Da zisplegañ gant merc'hodennoù war un teatr Gwignolig. Noz eo. Ar straad a zo goulaouet gant ul letern.

Pêrig, digempenn, e zegouezh, doare nec'het dezhañ.

Gwignolig en em ziskouez e prenestr e di.

An holl beziou a ganer war don " Au clair de la Lune".)

Gwignolig.

Pêrig, va mignonig,
Pêrig, Pêrig kaezh,
Gant da zilaad roget,
Da belec'h ez ez ?
Henternoz ' zo sonet.
N'eus mui den e kêr.
Rak an holl ' zo kousket,
Hag an tiez serr.

Pêrig.

Mont a ran da vale,
Bale 'hed an noz.
N'em eus ket a arc'hant,
N'em eus ti nag aoz.
Bez' ez eus bet tabut
Trezon ha va gwreg.
Hag an nor ' zo prennet
D'ober din an heg.

Gwignolig.

Pêrig, va mignonig,
Pêrig, Pêrig paour,
Da zohvaat ar merc'hed,
'Ranter parlant flour.
Kae da c'houlenn pardon.
Kerch en-dro d'an ti.
Te a vo pardonet.
Me ' zo sur e vi.

Pêrig.

Siwazh, va c'homperig,
Se an eus graet c'hoazh,
'M eus goulennet pardon
War va daoulin noazh.
Hi ' oa ouzh ar prenestr.
C'hoarzhnet ' deus hepken.
Goude ' deus distaoclet
Dour lous war va fenn.

Gwignola. (da Bêrig)

Ata, Paotr e truilhoù,
Aze petra ' rez ?
Te ' fell dit, lakepod,
Kas va gwaz er-maez !
Te ' zo bet oc'h evañ,
Te ' zo ruz da benn.
Kae da goll da venne,
Du-hont war ar foenn !

(o kregiñ e Gwignolig, hag o hejañ anezhañ.)

Ha te va Gwignolig,
Me 'm eus klevet mat.
Ret eo pilat merc'hed !
Da drugarekaat !
Se ' zo pezh a soñjez !

Dit e kousto ker.
Mar deo kann a glaskez,
Kann az po er gêr !

(En em gannañ a reont, Gwignola o lopañ gant he balaenn, ha Gwignolig gant e vataraz.)

Perina. (o tegouezhout)

O, va gwazig bihan,
Da belec'h out aet ?
Chomet va-unanik,
Bevañ ne raen ket.
Menlet ra vo Ddoue !
Kavet out erfin.
Amañ, deus da 'm c'hichen.
Deus da boket din.

Pêrig (o pokat dezhi)


O, va Perinaig,
Na me ' zo da vlam !
N'on ket evit mirout
C'hoari troioù kamm.
Me 'm eus da hegaset.
Me ' zo un den fall.
Gant ma vin pardonet,
' Rin ket ur wech all.

(Sellout a reont ouzh Gwignolig ha Gwignola, a zalc'h d'en em gannañ, ha neuze, brec'h-ouzh-brec'h, treiñ ouzh an arvesterien.)

Pêrig ha Pêrina.

O, pebezh abadenn !
Sellit, sellit 'ta !
Aze ez eus chabous,
Hag evit netra !
Dacu zen ' zo dimezet,
Chom e peoc'h bepred,
Se a zo ar vuhez
Bravañ ' zo er bed.

(Pellaat a reont. Gwignolig ha Gwignola a gouezh skuizh-marv war rizezenn ar prenestr.)



Embannet evit ar wech kentañ war
Ar Bed Keltiek, niv. 33, gwengolo 61.

AN DAOU DORT,

gant E. GALBRUN.

C'hoarierien : an displeger,
Nonnig an Tort,
Gabig, e vignon,
un nebeut Kornandoned.

Displ. - Ur wech e oa daou dort : Nonnig ha Gabig. Mignoned e oant o-daou
Kemenerien e oant o-daou ivez, ha bemdeiz ez aent da labourat
d'an tiegezhioù war ar maez, pep hini diouzh e du.

Un nozvezh ma oa Nonnig o tistreiñ eus e zevezh, diwezhat
un tammig, e klevas mouezioù o kanañ war lanneg Penn-Ar-Roc'h.

Dilun, dimeurzh ha dimerc'her.

Nonni. - Daoust 'ta piv ' zo o kanañ evel-se ?

Displ. - Hag e tostas goustadik. Sklaer e oa al loar hag e welas an dan
serien-noz, ar gornandoned, krog an eil e dorn egile, o tañsal
ur ganañ. Unan a gane da gentañ :

Unan. - Dilun, dimeurzh ha dimerc'her.

Korna. - Dilun, dimeurzh ha dimerc'her.

Displ. - Nonnig en doa klevet alies komz eus an danserien-noz met biskoa
n'en doa o gwelet hag ez eas da guzh a-dreñv ur roc'hell evit e
lout outo.

Prestik e voe gwelet ganto ha tapet e-kreiz o c'helc'h
ha int neuze da zañsal ha da dreñv en-dro dezhañ en ur ganañ
gwashoc'h eget a-raok :

Korna. - Dilun, dimeurzh ha dimerc'her.

Nonni. - Ha goude ? Gwall verr eo ho son !

Korna. - N'eus ken.

Nonni. - Penaos, n'eus ken ? Perak ne lavarit ket ivez : ha diriaou ha
digwener !

Korna. - O ! ya 'vat ! Se ' zo brav ! Aesaomp !

Unan. - Dilun, dimeurzh ha dimerc'her

Korna. - ha diriaou ha digwener.

Displ. - Ha plijadur vras d'an holl ken na zeuas ar c'houlz evit Nonnig
vont d'ar gêr.

Unan. - Petra a roimp d'an den-mañ evit bezañ hiraet ha kaeraet hor son

Korna. - Pezh 'garo !

Unan. - Arc'hant hag sour kement ha ma karo, pe bezañ didortet !

Nonni. - Mar karit ma didortañ e lezin ar peurrest gameoc'h a-galon-vat

Displ. - Ha kerkent e voe didortet. Diskenn a reas d'ar gêr skañv, sonn
hag eñ evel ur paotr koant !

An deiz-warlerc'h en em gavas gant e vignon Gabig.

Gabig. - Hola 'vat, Nonnig ! Petra ' zo c'hoarvezet ganit ? ha da dort ?

Nonnig. - Aet eo kuit, evel ma welez.

Gabig. - Ha penaos 'ta eo bet c'hoarvezet kement-se ?

Nonni. - Feiz 'vat, un dro iskis a-walc'h eo a zo bet c'hoarvezet ganin.
An noz all e kavis gornandoned o tañsal war lanneg Penn-Ar-Roc'h.
O son evat ne oa ket gwall hir : dilun, dimeurzh ha dimerc'her.
Paket on bet ganto en o zañs-tro ha desket em eus dezho ur pennad
all : diriaou ha digwener.

Gabig. - Dal 'ta !

Nonni. - Ken laouen e oant-holl m'o deus kinniget din acur hag arc'hant
leizh ma godelloù pe bezañ didortet. Gwelout a rez petra em eus
dibabet ha petra em eus lezet ganto a-galon-vat ! Ha setu-me bre-
mañ ur paotr koant ha mistr !

Gabig. - Ya, ya gwelout a ran, va faotr, gwelout a ran, ha va gourc'hemen-
nou dit evit da zibab !

Nonnig a va kuit.

Ya ! met me ' gred din ne vin ket ken sot ha te ! Pa ouzon bremañ
pelec'h mont ha penaos ober ne vo ket diaes din.

Kentañ gwech ma vo loar ez in-me ivez d'ober un dro e Lan-
neg Penn-Ar-Roc'h evit distreiñ d'ar gêr pinvidik. Ne vo ket
diaesoc'h mont un eil gwech ha deskiñ un tammig son d'ar Gornan-
doned evit o zañs-tro : abred a-walc'h e vin da c'houlema bezañ
didortet.

Pa vin pinvidik ha koant e vin ur pabor ! ha trec'h d'ar
paourkaezh genoc'h-se ha da galz a reou all war ar marc'hed !

Displ. - Evel m'en doa lavaret, e reas. War al lanneg e oa adarre ar Gor-
nandoned o tañsal hag o kanañ.

Unan. - Dilun, dimeurzh ha dimerc'her.

Korna. - ha diriaou ha digwener. (Treiñ ha lammat ha reont digeban. Gabig
a dosta tamm-ha-tamm.)

Gabig. - Ha goude ?

Unan. - N'eus netra ken...Petra ? ha gouzout a rafec'h pelloc'h ?

Gabig. - Ya 'vat ! N'eo ket diaes : disadorn ha disul !

Korna. - (o huchal a-bouez-penn) Pegen fall ! Ne glot ket mat gant hon
son !

Unan. - Ha neuze ar sul...Hou ! hou ! hou ! an sul n'eo ket deiz ar gor-
nandoned..

Korna. - Tapet-fall eo ar paotr ! tapet-fall eo !

Unan. - Ma ! un dra bennak a vo kinniget dezhañ erit e boan kouskoude...
Dibab ha dibab buan 'vat : lavar dimp petra ac'h eus c'hoant da
gaout...

Gabig. - O ! n' eo ket diaes dibab : ar pezh en deus lezet Nonnig a-gontez.

Korna. - (o c'hoarzhif hag o risignal) Hi ! hi ! hi ! Tapet e vo ! tapet
e vo ! Tapet eo ! tapet eo !

Displ. - Ar Gornandoned a anavez an dud... ha gouzout-mat a reont petra
a zo e spered Gabig an den pizh.

Unan .-Setu paotr fall, setu... O klask bezañ re fin, o klask kaout tra e kolli a-benn ar fin...Dal ar pezh en deus lezet Nonnie a-gostez... Dal e dort ! Ha te a vo ur paotr brav bremañ...

(C'hoarzhadeg, cholori ha goperezh gant ar Gornandoned.)

Displ.-Setu petra a c'hoarvez gant ar re o deus ur galon re stag ouzh ar binvidigezh hag a glask bezañ finoc'h eget ar re all !

vovovovovovovovovovovovov

Ar peznig-se a zo bet aozet gant an Itron Galbrun diwar ur gont tadenn gant E.Souvestre hag ar film berr "Tortig ha Balibouzig". Skeudennoù ar film a oa bet treset gant Pêr Peron hag ar film a oa bet graet gant an Ao.Galbrun, Doue d'e bardono !

An DAOU DORT a zo bet c'hoariet e Skol Sant Erwan d'ar 2 ha d'an 28 a viz mezheven 1959.

A N E T E V N E D E L E G

gant B.F.

Kinniget da werc'hed skol gristen Poullan.

C'hoarierezed: Ar vamm,
Lena, 15 vloaz,
Annaig, 12 vloaz,
Janig, 10 vloaz.

KENTAN ARVEST.

(Nozvezh ar Pellgent,nebut a-raok hanternoz. Diabarzh un ti paour war ar maez. Pa sav ar ouel,emañ an div c'hoar vihan en o gwele. Lena hag ar Vamm a zo dirak an oaled, o klask kempenn an tan. Gwisket int evel evit mont er-maez.)

Mamm. -Na pebezh tantad paour evit nozvezh Nedeleg ! Marv e vo a dra sur, pa vimp distro eus an oferenn. Yen-skorn evo ar gambr, ha tamm ebet da zebriñ. Warlene, da vihanañ, hor boa un etev Nedeleg kaer, ha peadra da ober ur fiskoan dereat. Warlene...

(Lena a ra.)

Lena. - Arabat dit gouelañ, mamm. Hon tad kaezh a zo eürus bremañ, peogwir emañ er Baradoz. Ha ni... Me ' zo sur ne chomimp ket atav en dienez, rak Doue a zo madelezhus, hag e raio un dra bennak evidomp.

Mamm. -Bolontez Doue ra vezo graet ! An dra-se a lavaran bepred. Ha koulskoude, kalet eo a-wechoù...Labourat ha labourat, hep gounit trawalc'h da baeañ hon ti hag hor boued, ha bezafi paouroc'h eget ar glaskerien-vara ! Rak ouzh ar re-se an dud o devez truez, hag ouzomp-ni n'o devez ket !

Lena. -Doue a wel ac'hanomp, hag a ro dimp ar pezh hon eus ezhomm.Pa ne ro ket dimp ar pezh a c'hoantaomp diouzitu, reiñ a ra dimp kalon da herzel ha da c'hortoz. O ! va mamm, pedet em eus ! Pedet em eus ken start hiziv ma 'z on sur e vo selaonet va fedenn gant Doue hag ar Werc'hez. En nozvezh-mañ ar Werc'hez vadelezhus a vez madelezhusoc'h c'hoazh, a greden, peogwir, o soñjal en he mabig Jezuz astennet er c'hraou, e teu da gemer muic'h a soursi ouzh an holl vugale vihan war an douar, a zo o krenañ gant ar riv hag o vervel gant an naon.

Mamm. -Va re-me da vihanañ,n'o devo ket da c'houzañv dibuzh ar riv. Emaint astennet en o gwele,kousket-mik. Aze int mat. Muñvreal a reont marteze ez int azezet ouzh un dacl gaer,gant a bep seurt tannoù lipous diraz hag an aelez o kana dezho an holl amzer. Paour-kaezh Annaig ! Paour-kaezh Janig ! Ha n'o deus bet da verenn nemet un aval hag un tammig bara sec'h !

Lena. -Gortoz... (Mont a ra, war beg he daoudroad,betek ar gwele.) Ya,kousket int. Dorn Annaig a zo krog e dorn Janig. Mousc'hoarzhid a reont. Hag e kav dit e c'hell ar Werc'hez dilezel ar re-se !

Mamm. - Me a garfe, Lena, bezañ leun a fiziañs evel-dout. Met te a zo yousk-Flamm, ha n'anavezez ket c'hoazh petra eo ar vuhez. N'anavezez ket c'hoazh petra eo gouzanv. Me a oa evel-dout ivez gwechall. Atav e vezen laouen. Ha pa 'z ae fall an traoù, e kreden ne oa netra d'ober nemet pediñ ha gortoz. Da vamm gaezh, Lena a zo deut c'hwezv he c'halon. Nann, n'em eus ket kollet yezh fiziañs e madelezh an Neñv. Met deut on da welout penaos heñchout ne oant ket heñchout an dud. Se a ra diaes din, rak ne ouzon ket penaos ober. Hag a-boan ma kredan pediñ.

Lena. - Mamm ! Arabat dit komz evel-se, rak n'eo ket an dra-se a zo e dor da galon. Daoust ha ne welan ket ac'hanout o pediñ bemdez, ha zoken en ur labourat, o lavarout ar chapelled ? Me a garfe gouzout piv, er barrez-mañ, a zo gwelloc'h kristen egedout ! An neb a bed ken alies, daoust ha kollet en deus fiziañs e bezañ ar bedenn ?

Mamm. - Gwir eo, Lena, marteze. Abaoe n'eo marv da dad, gant an holl vizer an eus bet, a-wechoù a lavaran traoù diboeñ, nep gouzout zoken. Met n'eo ket evidon e komzan. Evidoc'h eo, evidout ha da c'hoarezed bihan. Poan a ra din bezañ divarrek da demañ ac'hanoù c'h eus an dienez. Evel henczh, paean a ra din gwelout an oaled-mañ ken noazh, gant an tan hanter varv, hag etev ebet da ober enor d'an Neñv ha da lakaat joa e kalon an dud.

Lena. - Enorif a raimp an Neñv e-barzh hor c'halon, hag hor c'halon a vo leun-barr a levenez. (Klevout a reer kloc'h an iliz) Klev ! Kloc'h an oferenn ! Poent eo mont. Na brav e vo an iliz ! An dud, ar c'hantikou, ar gouleier, ar c'hraou bihan gant an deñved hag ar bastored, hag ar Rouaned Maj bliet gant ar steredenn ! Hiziv, n'eus mui a binvidien, n'eus mui a beorien, n'eus nemet bugale da Zoue o tridal pa glevont ar c'hann : "Gloria da Zoue e barr an Neñvou, ha peoc'h war an douar d'an dud a volontez vat !".

Mont a reont kuit, o serrif an nor didrouzik war o lerc'h. Al leurenn a chom goullio ur pennadig mat. Ha neuze, trumm, Annaig ha Janig, a lamm en ur c'hoarzhif eus o gwel.

Anna. - Buan ! buan ! n'eus ket a amzer da goll !

Janig. - Pelec'h emañ ?

Anna. - Kuzhet emañ, dindan ar bern pilhoù ! (Furchal a reont en ur c'horn e-touezh ar pilhoù). Tina gozh ha me eo hon eus kuzhet anezhañ emañ, un dro ma oa c'h aet ho-tri, mamm, Lena he te, er-maez. N'em eus ket lavaret dit, evel just, a-raok fenez. N'em eus lavaret da zen. Te a zo re hir da deod. Lavaret ez pije sur da vamm pe da Lena.

Janig. - N'em bije ket !

Anna. - N'eus forzh. Bremañ ne lavari ket, avat. Sell ! emañ 'mañ !

Janig. - Emañ 'mañ ! O, Annaig, re a bilhoù a zo tro-war-dro dezhañ !

Anna. - Re a bilhoù ! Gortoz... tenn da zaoarn alese. Te n'out mat da ober netra. Lez ac'hannou (Tennañ a reont ar pilhoù). Sell ! bremañ n'eus mui nemet sachañ anezhañ betek an oaled.

Janig. - Na pebezh pikol tamm koad !

Anna. - Deus da labourat. Te a gomzo goude. Me 'zo' vont da gregif er ur penn, ha te en egile. - 20 -

Janig. - Biken ne vimp evit dibradañ anezhañ ! Sell, pegen pommer eo !

Anna. - N'eo ket ken pommer-se. Tina gozh a c'helle dougen anezhañ en he zavarjer, he koulskoude ne oa ket kreñv, peogwir eo marvet daou viz goude.

Janig. - Marteze eo marvet abalamour ma he doa douget anezhañ.

Anna. - Diodez ma 'z out ! Honnezh a oa klafv pell 'zo gant an droug peultrin. En deiz ma oa deut ganin da gas ar skod-mañ ne rae nemet pasaat, ma oa un droug klevout anezhi. Ha koulskoude e oa pinvidik, war a lavarer !

Janig. - Pinvidik, Tina gozh !

Anna. - (O c'hoarzhif). A a ! An dud a lavare e lakae a-gostez kement gwenneg a veze roet dezhi, en un toull bennak en he lochenn. Ker-kent ha m'eo marvet, eo deut an archerien da glask. Met kaer o deus bet furchal ha treiñ-distreiñ, aet int kuit evel ma oant deut. Soñj an eus he doa Tina lavaret din alies : "Ne daio ket va feadra gant an dud a lezenn, Annaig, kaer o devo klask lakaat o c'hraban warnañ !".

Janig. - Ha perak he deus roet dit ar skod-mañ ?

Anna. - Da ober etev Nedeleg. "Dal, emezi. Setu emañ evit da vamm da ros-tañ e-barzh an oaled nozhvezh ar Pellgent. Ne vin mui emañ neuze. Met marteze ha devo soñj 'annon, hag e lavaro ur bater pe ziv evidon, rak me n'em bo den all ebet da bedif evit va ene."

Janig. - Ur plac'h drol e oa memes tra !

Anna. - Bez' e oa sur ! Met bremañ, marvailhet a-walc'h ! Ane ! deomp gantañ ! Ne welez ket emañ an tan o vervel ?

Janig. - (O tibradañ ar skod un nebeudig). O Annaig, na pommer eo ! N'hellan ket loc'hañ anezhañ !

Anna. - Ta, ta, ta ! loc'het evo. Ane ! oust ! Deus emañ da sachañ ! (Sachañ a reont ar skod betek kreiz al leurenn).

Janig. - Gortoz, Annaig. Torret eo va c'heñ !

Anna. - Pebezh etev kaer ! Biskoazh ne vo bet unan kaeroc'h en ti-mañ. Ane, sachomp adarre !

Janig. - Annaig, skrafignet eo va biz !

Anna. - Petra 'ra se ? Kerzh da gemer un tamm pilhoù, da gregif emañ. Prest out ? An taol mat en dro-mañ ! (Sachañ a reont ar skod betek an oaled). Lez ac'hannou bremañ. Te 'zo kab da vougan an tan. (Kempenn a ra ar c'heñved en-dro d'ar skod.) Kae da glask skolpoù 'ta ! (Janig a sent).

Ya, gant Tina ! Ar skod-se a oa dezhi. Mirer e veze ganti. Ha mamm a oa bremañ o leñva peogwir ne oa ket a etev Nedeleg er bloaz-mañ ! (C'hwezhañ a ra war an tan). Kregif a ri, pe ne ri ket !

Janig. - Ne grog ket.

Anna. - (Droug enni). Ne grog ket, sur, ha te a chom da zigerif da c'heñ noù bras dirazañ ! (Ar flammoc'h a vary).

Janig. - Ha ma lavarfeomp ur bedenn evit ma krogo !

Anna. - Ur bedenn n'eo ket kaer a-walc'h. Ni 'zo' vont da gregif ur c'hantik. (Daoulineañ a reont o-div dirak an oaled, hag e kanont) :
- 21 -

EIL ARVEST.

(Ar ambr a zo heñvel atav, kant an tan o flammañ. Nemet an div
blac'hig a zo set d'o gwele. Ar vamm ha Lena a zeu tre.)

Mamm.- Jezuz Maria ! Sellit ouzh an oaled !

(Annaig ha Janig a lamm trumm eus o gwele hag en em laka da zañ-
sal en-dro d'o mamm.)

Anna.- Ar mabig Jezuz, mammig, en deus degaset dimp un etev Nedeleg. Gwe-
let em eus anezhañ, ha Janig ivez. N'eo ket gwir, Janig ?

Janig.- Ya, hag ur gurunenn aour en doa war e benn.

Mamm.- N'eo ket brav, Annaig, lavarout gevier d'he mamm, ha lakaat he
o'hoar vihan d'ober ivez. Pelec'h hoc'h eus kavet an tamm koad-
se ?

Anna.- N'eo ket un tamm koad, mamm. Bez' ez eo hon etev Nedeleg.

Lena.- (Tostaet he deus ouzh an oaled, hag emañ o tommañ he daouarn).
Na tomm eo ! na brav eo ! Ha ni a zo bet skornet war an hent
gant an avel but o c'hwezhañ eus ar menez ! Goude levezet an o-
ferenn, setu ul levezet all. Trugarez Gwerc'hez vinniget, ha
C'hwi Mabig Jezuz, evit ar vadelezh hoc'h eus bet henozh en hor
c'heñver !

Mamm.- Lena ! Lena ! ha ma vefe bet ar skod-mañ laeret digent unan
bennak !

Anna.- (Buen) Evit laeret n'eo ket bet. Roet eo bet din gant Tina.

Ar Vamm ha Lena, assemblez, Gant Tina !

Anna.- Ya, gant Tina ! Ar skod-se a oa dezhi. Miret e veze ganti e korn
he lochenn.

Mamm.- Gant Tina, a zo marvet tui miz 'zo !

Anna.- Ya, mamm. Amañ e oa pell' zo, kuzhet e-touezh ar pilhoù. Ha roet
eo bet evidout, da zevit war an oaled nozvezh ar Pellgent.
"Evel-se, a lavare Tina, he devo da vamm un etev Nedeleg
evel ar re all, ha marteza e lavaro ur bedenn evidon !"

Mamm.- A dra sur em eus lavaret ur bedenn eviti, paour-kaezh Tina, hag
e rin c'hoazh. Ne ouzon ket perak, on bet o soñjal emni e-pad
an oferenn.

Lena.- Met pebezh donezon souezhus ! Ha perak da Annaig, dre guzh dicuzh
ar re all !

Anna.- Ya, difennet e oa bet din ganti lavarout da zen ebet. Me a veze
atav war-dro Tina. Soñj hoc'h eus, pa oa klañv-bras en he gwele,
me eo a yas da gas dezhi an tizan hag al louzoù a veze aozet
gant mamm eviti. Karantez vras he doa ouzhin, hag e lavare din
a bep seurt traoù na gomprenet ket alies. Ma ! n'eo ket ur wech,
na div wech, met meur a wech he deus komzet din eus ar skod-se,
o lavarout din bep troompas ankounac'haat anezhañ.

Lena.- Roet he deus dimp ar pezh e c'helle. Hag abalamour dezhi ez omp
eñrus amañ henozh.

Mamm.- Pa edon o vont kuit eus an iliz, merc'h ar vouloñjerez he deus
degaset din peñer c'hoign a-berzh he mamm. Ni 'zo 'vont da
dommañ ur banne kafe. Evel-se hor bo hor fiskou, dirak hon etev

Nedeleg evel ar re binvidik ! Laka ar c'hafe war an tan, Lena !
(Lena a sent.)

Anna.- Ha me ha Janig a zo o vont da dresañ an daol.

Lena.- (Daoulinañ a ra dirak an oaled.) Na souezhus eo an tan-mañ,
mamm. Ul liv iskis a zo gantañ. Sell, hag a flammoh o tont er-
maez eus an etev ! Biskoazh n'em eus gwelet koad o tevit e-giz-
se. (Strakañ a ra an tan). Sell, sell, emañ o terrif ! emañ un
dra bennak o kouezhañ dioutañ !

Mamm.- Va Doue, va Doue ! pezhioù-moneiz ! pezhioù arem, pezhioù ar-
c'hant, pezhioù aour ! Un teñzor, va bugale ! Un teñzor, kuzhet
en etev Tina gozh !

Anna.- Me 'ouie mat e oa un dra bennak en etev-se, ha koulskoude ne
ouien ket petra 'oa.

Janig.- Ha me a gave din e oa gwall bonner evit un tamm koad.

Mamm.- Diwallit da douchañ ar pezhioù-se. Leskiñ a rafec'h he pizied.

Anna.- Ma ! ni 'zo pinvidik bremañ !

Janig.- Ni 'zo pinvidik-mor. Morse ne c'hellimp kontañ an holl arc'hant
se !

Anna.- Hag ar arc'hant-mañ 'zo dimp. N'eo ket bet laeret. Tina ne oa
ket sot. N'eo ket gant an dud a lezann, na gant an archerien
kennebeut, he deus lezet he fedra !

Janig.- Ha mat he deus graet ivez.

Lena.- Petra 'lavaren dit, mamm, a-raok mont d'an oferenn ? Daoust
ha n'eo ket bet selaouet hor pedenn ?

Mamm.- Ur bedenn deut eus ar galon a dizh bepred skouarn Doue !

Lena.- Morse ne zilez an Aotrou Doue ar re o deus fiziañs annañ !

Mamm.- Gloar d'ar mabig Jezuz ha d'e vamm santel !

Lena.- Bremañ ha bepred, ha betek fin ar c'hantvedoù !

Mamm.- N'hellan mui kaozeal. Re leun eo va c'halon.

Anna.- Ia, mammig, met goullo eo hor stomok.

Janig.- Ar c'hafe 'zo tomm bremañ.

Mamm.- A-raok debriñ hag evañ, va bugale, lavaromp holl ur bedenn d'an
hini a veilh atav war e vuñale, hag a ro pecc'h d'an dud a vo-
lontez vat.

(Daoulinañ a reont holl.)

B. F.

Embannet evit ar wech kentañ war KANNADIG GWALARN, niv. 3, kerzu 1932.
Roparz Hemon a skrive da SKOL nevez 'zo: "An aotre a ro-
an deoc'h da adembann "An Etev Nedeleg". War a gradenn eo bet savet, pe
da vihanañ kempennet ganin, marteza diwar ur gontadenn bohl bennak.
"B.F.", mar em eus soñj mat, ne oa den ebet."

A L L E U E A O U R ,
gant Dinaig.

C'hoarierien : Yannig SEITEK,
Jerom an TOUTOU, labourer-douar,
Jani LANTURLU, kigerez,
Dr TRACNVEZ, mezeg,
Aristid LAGADU,
Gwenole BIVIDIG, barnar.

KENTAN ARVEST
E ti Yannig.

Mañ Yannig o tijunif. Dre ar prenestr e klevet: " Ar C'heleier ! Ar
C'heleier ! Prenit Keleier Roazhon, gwellañ kelaouenn ar vro ! ". Yannig
a zigor ar prenestr.

Yann.- Hep ! hep ! Paotr ! Ro din un niverenn. Dal ! setu 2 wenneg. Tru-
garez.

(Azezañ a ra hag e lenn a vouezh uhel.)

" E Tregadon ez eo kouezhet an Aotrou Maer dre brenestr an ti-
kêr. Moñ ! Paour-kaezh den ! Ma vije bet startoc'h ar prenestr..

.. Plouvarieg : Ar Groaz a enor en deus bet Job Trelu evit...

(Lopañ a ra war e dal) Ma ! N'em boa ket soñj ! Ha va embann ?

Daoust ha moulet eo bet war niverenn hiziv ? Se an boa goulennet

(Klask a ra ar kelaouenn) Ya ! ya ! ya vat ! Setu : "Leue 6 niz da

werzhañ e ti Yannig Seitek e Roc'htudon. Dont etre 9 e-heure ha

kreisteiz"

(Sellout a ra ouzh e vontr) 9 eur 10 eo dija ha n'on ket

preet ! Gwir eo ne oan ket fall em gwele !

(Skeiñ a reer war an nor.)

Ya ! ya ! deuit tre ! (Jo. an Toutou a antre).

Jero.- Doue d'ho pennigo !

Yann.- Bennozh-Doue deoc'h ! Pensaos ez a an traoù ganec'h ?

Jero.- Ne da ket re fall. N'eus ket da glemm re. Yac'h eo an dud hag an

edeier n'int ket re suilhet gant ar yenijenn.

Yann.- Ha da draktor nevez ? N'eo ket diroudet c'hoazh ?

Jero.- N'eo ket 'vat ! Bale brav a ra. M'az piñe c'hoant d' eourmin deiz

pe zeiz...

Yann.- Nann ! trugarez ! Evit ar mare n'em eus ket ezhomm. Labour a-

walc'h am eus gant va chatal...

Jero.- Hañ ! Gwir eo ! Ganit-te eo bet lakaet un embann diwar-benn ul

leue ?

Yann.- Ya ! ganin me ! Te a garfe e welout ?

Jero.- O ! teurel ur sell n'eo ket prenañ. Met ma vefe tu da brenañ, mar-

teze ne lavarfen ket nann.

Yann.- Deus'ta ! N'emañ ket pell. N'eus nemet un nor da zigoriñ.

(Yannig a zigor an nor hag e klevet " Meuseuseueu... " Jerom a an-

tre ar -'hraou; Yannig a chom er sal.)

Jero.- Febezh loen kaer ! Biskcazh...

Yann.- (o sellout) Nann, n'eo ket houmañ... Houmañ eo ar vamm. Al leue
da werzhañ a zo en he c'hichen.

Jero.- (disouezhet) A ! ... N'eo ket gwall lart... Prenañ a-walc'h a ra-
fen memes tra.

Yann.- Tri skoed !
(Dont a ra Jerom en-dro.)

Jero.- Pevar real !

Yann.- Goap a rez. Ul leue ken brav !

Jero.- Alo ! Eizh real evit ober plijadur dit .

Yann.- Diskenn a rin betek ur skoed. Izeloc'h avat ne din ket.

Jero.- Dek real ha chañs ac'h eus c'hoazh !

Yann.- Nann 'vat ! Ur skoed am eus lavaret !

Jero.- Mat ! mat ! Ur skoed mar karez. Met koll a rin arc'hant gant da

leue ! Graet ar marc'had ?

(Skeiñ a reont an eil war baiv egile.)

Yann.- Graet ar marc'had.

Jero.- (furchal a ra en e valc'h) Ma ! ma ! satordalik ! M'eus ket mo-
neiz a-walc'h ganin... Dal ! Setu pevar real. Din eo al leue !...

An nemorant a zegasin dit bremaik.

Yann.- Mat ar jeu evel-se, mat degas din an eizh real a vank a-benn fe-
nozh !

Jero.- Ya ! ya ! Nebaon ! graet e vo ... Kenavo bremaik ! (Mont a ra
kuit.)

Yann.- Kenavo ! Arabat dit ankoumañ'haat ! (Frotañ a ra e zacuarn.)
Gwerzhet al leue ! mat ar stal ! (Azezañ a ra da lenn a kelaou-
enn. Skeiñ a reer war an nor)

Ya ! ya ! deuit tre ! (Jani Lanturlu a antre).

Jani.- Doue d'ho pennigo !

Yann.- Bennozh-Doue deoc'h ! Pensaos ez a an traoù ganec'h ?

Jani.- Ne da ket re fall. N'eus ket re da glemm ! Yac'h eo an dud hag
ar c'hig a zo gwerzh mat warnañ er mare-mañ, ha marc'had-mat ar
chatal.

Yann.- Hag ho stal nevez ? N'eo ket kouezhet en he foull c'hoazh ?

Jani.- N'eo ket 'vat ! Start-kaer eo. M'ho piñe c'hoant da gaout labour
deiz pe zeiz...

Yann.- Nann, trugarez ! Evit ar mare 'm eus ket ezhomm. Labour a-walc'h
am eus gant va chatal...

Jani.- A ! ya gwir eo ! C'hwi eo hoc'h eus lakaet un embann diwar-benn
ul leue ?

Yann.- Ya ! me eo. C'hwi a garfe e welout ?

Jani.- O ! teurel ur sell n'eo ket prenañ ! Met ma vefe tu da brenañ,
arteze ne lavarfen ket nann.

Yann. - Deuit 'ta ! N'emañ ket pell. N'eus nemet un nor da zigeriñ.
(Yannig a zigor an nor hag e klever : "Meueueueu..." Jani a antre er c'hraou; Yannig a chom er sal.)

Jani. - Pebezh loen kaer ! Biskoazh...

Yann. - (o sellout) Nann, n'eo ket houmañ. Houmañ eo ar vamm. Al leue da werzhañ a zo en he c'hichen.

Jani. - (disouezhet) A ! N'eo ket re lart ...Prenañ a-walc'h a rafen memes tra.

Yann. - Tri skoed !
(Jani a zeu en-dro)

Jani. - Pevar real !

Yann. - Goap a rit, Jani ! Ul leue ken brav !

Jani. - Alo ! Eizh real evit ober plijadur deoc'h.

Yann. - Diskenn a rin betek ur skoed. Izeloc'h avat ne din ket !

Jani. - Dek real, ha c'hoazh hoc'h eus chañs.

Yann. - Nann 'vat ! Ur skoed am eus lavaret !

Jani. - Mat ! mat ! Ur skoed mar karit. Met koll a rin arc'hant. Graet ar marc'had ?

Yann. - Graet ar marc'had !
(Skeiñ a reont an eil war balv egile.)

Jani. - (O furchal en he valc'h) Ma ! ma ! Satordalik ! 'm eus ket moneiz a-walc'h ganin. Dal ! Setu pevar real . Din eo al leue. An nemorant a zegasin deoc'h bremaik.

Yann. - Mat ar jeu evel-se, met degasit din an eizh real a chom a-benn an noz.

Jani. - Ya ! ya ! Nebaon ! Graet e vo . Kenavo ! (Mont a ra kuit.)

Yann. - Kenavo bremaik(frotañ a ra e zaouarn) Gwerzhet al leue ! Mat ar stal !... (Azezañ a ra ha lenn ar gelaouenn. Skeiñ e reer war an nor.)
Ya ! ya ! deuit tre ! (An Dr Traoñvez a antre.)

Dokt. - Doue d'ho pennigo !

Yann. - Bennozh-Doue deoc'h, Aotrou Mezeg ! Penaos ez a an traoù ganeoc'h ?

Dokt. - Ne da ket re fall ! N'eus ket da glemm re. Klaviñ eo an dud : rann ha sifern e pep ti ! Ar serom 'vat a zeu da vankout.

Yann. - Hag ho karr nevez ? N'eo ket diroudet c'hoazh ?

Dokt. - Nann 'vat ! Ruilhaf kaer a ra. N'ho vije d'eoant da zont da bour-
men deiz pe zeiz...

Yann. - Nann...trugarez ! Svit ar mare 'm eus ket ezhom. Labour a-walc'h am eus gunt va chatal...

Dokt. - A ya, gwir eo ! C'hwi eo hoc'h eus lakaet un embann diwar-benn ul leue ?

Yann. - Ya ! me eo ! C'hwi ' garfe e welout ?

Dokt. - O ! teurel ur sell n'eo ket prenañ ! Met ma vefe tu da brenañ, marteze ne lavarfen ket nann...

Yann. - Deuit 'ta ! N'emañ ket pell. N'eus nemet un nor da zigeriñ.
(Yannig a zigor an nor hag e klever : Meueueueu..." Ar mezeg a a antre er c'hraou; Yannig a chom er sal.)

Dokt. - Pebezh loen kaer ! Biskoazh....

Yann. - (o sellout) Nann, n'eo ket houmañ...Houmañ eo ar vamm. Al leue da werzhañ a zo en he c'hichen.

Dokt. - A ! N'eo ket re lart...Prenañ a-walc'h a rafen memes tra.

Yann. - Tri skoed ! (Ar mezeg a zeu en-dro.)

Dokt. - Pevar real !

Yann. - Goap a rit, Aotrou Mezeg. Ul leue ken brav !

Dokt. - Alo ! Eizh real evit ober plijadur deoc'h.

Yann. - Diskenn a rin betek ur skoed. Izeloc'h avat ne din ket.

Dokt. - Dek real, ha c'hoazh hoc'h eus chañs !

Yann. - Nann 'vat ! Ur skoed am eus lavaret !

Dokt. - Mat ! mat ! Ur skoed mar karit. Met koll a ran arc'hant. Graet ar marc'had ?

Yann. - Graet ar marc'had ! (Skeiñ an eil war balv egile.)

Dokt. - (o furchal en e valc'h) Ma ! ma ! Satordalik ! 'm eus ket moneiz a-walc'h ganin ! Dalit : setu pevar real. Din eo al leue ha gantañ e vo graet serom da bareañ an dud klaviñ...An nemorant a zegasin deoc'h bremaik.

Yann. - Mat ar jeu evel-se met degasit din an eizh real a chom a-benn fenozh.

Dokt. - Ya ! ya ! Nebaon, graet e vo. Kenavo ! (Mont a ra kuit.)

Yann. - Kenavo bremaik ! (frotañ a ra e zaouarn.) Gwerzhet al leue ! Mat ar stal ! Mat bremañ ! Gwerzhet mat eo ! Savet eo an Dok-
tor. Trañvez betek ur skoed. N'eo ket divalav ur skoed...Met ...
MetBoullc'hurun ! Sofj am eus ...Jani Lanturli ivez a zo
savet betek ur skoed ha ...Jerom an Toutou ivez ...Neuse...neu-
ze 'vat 'm eus gwerzhet va leue teir gwech ! Ha pep hini en deus
roet din pevar real.
Ur skoed ouzhpenn am eus em godell hag emañ
bepred va leue em c'hraou. Tra la la lenj ! (Korolliñ a ra.) Un
dro gaer...Un dro gaer... Ur paotr fin out Yannig !
(A-daol trumm e paouez da korolliñ.)
Evel-just aour ha leue am eus. Ur marc'had kaer am eus graet.
Met pegait e pado ? (Azezañ a ra ha kemer e benn en e zaouarn.)
Pa zeuint da zegas din pep a eizh real ha da c'houlenn al leue...
da biv e vo roet ? ...Han ...hañ ...? D'an hini kentañ zeuy mar-
teze. Ya, evel-just. Met petra a lavaro ar re all ? Ha ma vefe
prosez ouzhin ? (Social a ra dilavar.)
Han ! N'on ket ken fin se ! Decmp da velout an Aotrou
Lagadu. Hemañ en deus ijin ha gwidreñ leun e benn. Hemañ e sie-
plego din petra ober.

EL ARVEST.
e ti Aristid Lagadu.

(Emañ Aristid Lagadu o skrivañ. Tok-tok war an nor.)

Aris.- Ya ! ya ! deuit tre !

Yann.- Demat deoc'h, Aotrou Lagadu.

Aris.- Demat, Yannig ! Penaos emañ ar bed ganit ? Nec'het-bras e seblantez.

Yann.- Nec'het on, an dra ' zo sur ! Ha koulskoude e kave din da gentañ em boa graet un afer vat. Deut on da c'houlenn ali diganeoc'h.

Aris.- Gra kouezet 'ta, Yannig, ha bez fiziañs ennon. Na ra ket biloù ! Diskoulmet e vo da gudenn hep lugudifi. Lavar din petra az laka nec'het.

Yann.- Hama ! M'em boa ul leue da werzhañ. E werzhet em eus da dri ven. Pep hini en deus roet arrez ha pep hini a zeuy d'e gerc'hat a-benn an noz. Da biv e vo roet ? N'ouzon tamm ebet, rak forzh penaos unan hepken en de al leue hag an daou all e vin friket ganto pa ouezint ez eo aet al leue gant un all. Penaos ober ?

Aris.- (Lakaet en deus e benn etre e zaouarn, serret e zaoulagad da soñjal gwelloc'h; a-raok respont e laok ur pezh huanadenn; sellout a ra garv ouzh Yannig ur pennad hir hep respont).

Ur gwall afer eo da hini, Yannig. Diaes-bras da ziluziañ ! Frest out da baeñ daou skoed din evit va c'huzulioù ?

Yann.- Ya, Aotrou Lagadu ! ... ma tremen mat an traoù evel just.

Aris. Ya ! se a zo anat. Bremañ selaou mat, paotr: pa c'houlenno ar dud : " Pelec'h emañ al leue ? " n'az po nemet ober evel-hen ... Sell mat ouzhin ha gra eveldon 'Yannig a ra ar memes jestroù ha Lagadu' Da zorn dehou e-kichen da jod dehou. Da viz-yod astennet. Hic kem... ! Bremañ, tremen buan ha buan, div pe deir gwech, da viz-yod dindan da fri en ur ober "pst, pst..." Ger ebet avat ! ha dispourbell bras da zaoulagad da sellout ouzh an dud. Kredifi a raint ez out foll ha ne chomint ket pelloc'h da c'houlenn al leue. Hemañ a chomo ganit hag an arrez ivez.
Ha neuze e rei daou skoed d'an Aotrou Lagadu evit e guzulioù mat.

Yann.- Trugarez Aotrou ! Me 'red e chomo ganin al leue hag an moulloù a-drugarez d'hoc'h alioù. A ! A ! A ! Kenavo ! (Mont a ra kuit)

TREDE ARVEST.
e ti Yannig adarre.

(Emañ Yannig oc'h ober ul labour bennak en e di. Tok-tok war an nor.)

Yann.- Hañ ! hañ !

Jero.- Doue d'ho pennigo ! (Yann ne respont ket.)
Degas a ran an arc'hant. (id.)

Petra ' c'hoarvez ? Simudet out ? Hag aleus, e pelec'h emañ ?

Yann. (Dispourbellet e zaoulagad hag o tremen e viz dindan e fri.)
Psht ! pst ! pst ! pst !

- 28 -

Jero.- Va leue a c'houlennan ! N' ec'h eus ket komprenet, penn droch ?

Yann.- (oc'h ober ar memes jestroù) psht ! psht ! psht !

Jero.- Hailhon ! Foet boutig ! Lakepod ! Laer an dud ! 'Vi ket mestr warnon ! D'ar bidouf ez i ! Me ' ya da gerc'hat ar barner. (mont a ra kuit.)

Yann.- (a ra ur c'hruz d'e ziskoaz hag ec'h adkrog gant e drepetoù. Tok-tok war an nor.)

Hañ ! hañ !

Jani.- (en ur antreal) Doue d'ho pennigo ! (Yannig ne respont ket.)
Degas a ran an arc'hant. (id.)

Petra ' c'hoarvez ? Simudet oc'h ? Hag al leue, e pelec'h emañ ?

Yann.- (en ur ober ar memes jestroù.) psht ! psht ! psht !

Jani.- Va leue a c'houlennan ! N'hoc'h eus ket komprenet, penn-droch ?

Yann.- psht ! psht ! psht !

Jani.- Hailhon ! Foet boutig ! Lakepod ! Laer an dud ! D'ar bidouf ez eot ! Me ' ya da gerc'hat ar barner. (mont a ra kuit.)

Yann.- (a ra ur c'hruz d'e ziskoaz ha goude, e zaouarn en e c'hodellou, e ra donemone er sal. Doue e seblant. Tok-tok war an nor.)

Hañ ! hañ !

Dokt.- (oc'h antreal) Doue d'ho pennigo ! (Yannig ne respont ket)
Petra ' c'hoarvez ? Simudet oc'h ? Hag al leue, e pelec'h emañ ?

Yann.- Psht ! psht ! psht !

Dokt.- Va leue a c'houlennan ! N'hoc'h eus ket komprenet; penn droch ?

Yann.- Psht ! psht ! psht !

Dokt.- Hailhon ! Foet boutig ! Lakepod ! Laer an dud ! D'ar bidouf ez eot ! Ma ' ya da gerc'hat ar barner. (Kuit ez a.)

Yann.- (a ra ur c'hruz d'e ziskoaz, azezañ, kemer e benn etre e zaouarn, nec'het eo). Tok-tok war an nor.)

Hañ ! hañ !

Aris.- (oc'h antreal) Salud dit, Yannig ! (Yannig ne respont ket.)
Ha neuze, deut int ? (Yannig a respont YA gant e benn)

Ha chomet eo leue hag arc'hant ganit ? (id.)

(oc'h astenn e zorn) Gourc'hemenoù, mignon ker. Me' cuis mat ez out finoc'h eget ar re-se ! Yannig ar paotr fin, ro din bremañ va daou skoed.

Yann.- Psht ! psht ! psht !

Aris.- Penaos ?

Yann.- Psht ! psht ! psht !

Aris.- A ! A ! Trucher lous ! ganaz brein ! boued ar groug ! D'ar bidouf ez i ! Me ' ya da gerc'hat ar barner. Ha me a anavez al leue zenn, me !

- 29 -

(Yannig a ra orbicou dezhañ ! Prest eo Lagadu da vont er-maez pa skoer war an nor.)

Yann.- Ya ! ya ! deuit tre !

Gwen.- (oc'h antreal) Doue d'ho pennigo !
(War e lerc'h ec'h antre Jerom, Jani hag an Doktor.)

Yann.- (Aonik hag azacuezus) Bennoz-h Doue deoc'h, Aotrou Barner.
Pe pe pe naos emañ ar be be be bed ganec'h ? A a a a a zezit, me ho pe pe ped (astenn a ra ur sador d'ar barner a azez.)

Gwen.- Deuet on amañ, Aotrou Yannig Seitek, diwar glemm an Itron Jani Lanturlu, amañ, hag an Aotrou Jerom an Toutou, aze, hag an Aotrou Budok Traoñvez, doktor war vezegiezh, aze. Her...

Aris.- (o troc'hañ war gomz ar barner) Me ivez a sav klemm, Aotrou Barner. Ne fell ket d'an hailhon-mañ paeañ ar c'huzulioù an eus roet dezhañ.

Gwen.- Gortozit, Aotrou Lagadu. N'em eus ket echuet gant va c'haoz. Neuze..., hervez ma lavaront, c'hwi, Yannig Seitek, hoc'h eus gwerzhet bep a leue c'hwec'h miz dezho. Pep hini anezho en deus roet pevar real arrez. Ha pa 'z int deuet tuchantik da zegas nemorant an arc'hant na da gerc'hat al leue, leue ebet n'hoc'h eus roet dezho, jestroù droch ha diseven na lavaran ket. Petra hoc'h eus da respont war se, Yannig Seitek ?

Yann.- Keuz am eus, Aotrou Barner. Me a garfe, a galon laouen, reiñ da bep hini e leue met, e gwirionez, n'em eus ken nemet uran.

Jani, Jerom, An Doktor, o zri asamblez. Din eo ! Paeet 'm eus arrez !
Din al leue !

Gwen.- Peoc'h ! Neuze 'ta, Aotrou Seitek, dre deir gwech hoc'h eus gwerzhet ar memes leue ha teir gwech hoc'h eus touchet arrez. Ha miret al leue ganec'h war ar marc'had ! ...Grevus-bras eo ! skraperezh eo ! Petra hoc'h eus da ziskleriañ ?

Yann.- Hañ ! hañ ! N'eo ket ganin eo bet kavet an dro-se ! Eh eo, Aotrou Barner, (diskouez a ra Lagadu) eh eo en deus kuzuliet din c'hoari an hini foll evit spontañ an dud ha mirout evidon arc'hant ha leue. Heptañ n'em bije ket graet !

Gwen.- Ya ! N'oc'h ket bet gwell fin ! ret eo kredañ ! (o sellout ouzh Lagadu) C'hwi avañ a zo fin a-walc'h, fin-bras zoken. Met ar finesa ne dalv netra pa ne vez ket renet gant an onestir. Ha c'hwi Lagadu, n'oc'h ket gwall onest. Brudet oc'h evit ho kuzulioù fall hag ho troioù kamm.

Aris.- Biskoazh, Aotrou...

Gwen.- Roit peoc'h ! Ha c'hwi holl ac'hance'h tavit ! Emañ ar barner meur Gwenole Bibidig o vont da varn. (Kroaziañ a ra e zivrec'h, serriñ e zaulagad, peoc'h gant an holl...astenn a ra e zivrec'h)

Me, Gwenole Bividik, Barner Meur Plouarzen, goude bezañ selaouet tamallerien ha tamallad, goude bezañ hir brederiet, em fuzne e tisklerien :

-da gentañ: kondanoet eo Yannig Seitek da rentañ d'o ferc'henned an arrez bet roet dezhañ; gwerzhet e vo ez leal al leue d'ar c'hentañ prener.

-da eil: kondanoet eo Aristid Lagadu da reiñ bep a bevar real da Jani Lanturlu, da Jerom an Toutou, d'an Doktor Budok Traoñvez evit o digoll eus an nec'hamant degaset dezho diwar e guzulioù fall.

Aris.- Diouzhtu ! Mont a ran d'o c'herc'hat. (Kuit ez a)

Gwen.- -da drede: Ha da echuiñ kondanoet eo Yannig Seitek da basañ bep a chopinad sistr d'an holl...
Ha bremañ sevenit divizoù ar barner !

(Yannig a greg en dud a zo war al leur-c'hoari hag ez eont holl kuit er ur renañ :)

Ev sistr 'ta Laou,
Rak sistr 'zo mat !

..... (pe ur son all).

Pezh-C'hoari diembann eczet gant

DINAIG.

BURZHUD AR C'HLLOC'H DI,
gant Yann ar C'harv, Drouiz Ab-Gwenael.
E koun Yann-Vari Perrat ha Jakez Riou.

C'hoarierien : Meliav, kloc'her tri-ugent vloaz, bras ha moan, gant ur gant ur gleizenn war e zremm.
Ronan, kurust, dek vloaz, daoulagad lemm ha kalon-dan.
Goulo'hen, mignon Meliav, tad Ronan.
An Ab-Kerherve, aluzener, beleg oadet, kof dezhañ ha blev gwenn.
Seza, karabasenn an Ab-Kerherve.

An arvest a dremen e 1532. Kamb vein Meliav. War an tu kleiz: tour Kreiz-kêr Kastell-Paol. Pa sav ar ouel, emañ Meliav o lakat kantolrion de luffrañ ha Ronan o lemm pennad buhez Breizh war dimeziñ an Dukez Anna.

TAOLENN GENTAN.

Ronan. - (olenn) "Ar verc'h kalonek-se, Anna a Vreizh, hon duke vat a stourmas e-pad tri bloaz gant harp he fobl : an dudjentil, ar vourc'hizion, ar gouerieded savet holl a-unan. Koulskoude e te-gouezhas un devezh poeus: Anna fallgalonet hag an dour en he daoulagad, a rankas dimeziñ gant Charlez Eizh, daoust d'an doan en doa graet dezhi ha d'ar vro. Truezus va stad ! a lavare an duke vat vihan, minorez abaoe ur pennad ha prometet da roue Bro-Austria, goude bezañ bet gouennet meur a wech gant noblañsoù ar vro, loarned kozh evel Rieug...
Meliav. - Setu aze ur Vretonez penn-kil-ha-troad ! Ur plac'h hag a ouie gonit hag entanañ kalonoù he sujidi.
Ronan. - Gwelet hoc'h eus anezhi ur wech bennak ?
Meliav. - Ya ! Va mab ! Er Follgoad, ouz treid an Itron Varia. Na pebez dudi ! Tad a vilieroù, kroazioù e-leizh, eskibion, menec'h, personed, Paganazed ha Plougastelliz...Kaeroc'h eget ar c'h relegoù hor sent kozh: tud a vrezel harnezet evel da zeiz an argad; itronezed gant saeoù voulouza ha seiz; e-kichen ar feunteun : ar re zall, ar re vut, ar re gamm hag all ! C'hwez an ezanañ, ar c'han, son skintin ar c'hloier ar c'hant, un heol skedus o parañ war bpe tra, ha dreist-holl war an inkane a zouge an duke vat Anna...
Ronan. - An duke vat Anna !
Meliav. - Ya ! va mab ! an duke vat Anna ! Anna a Vreizh, koant evel ar Werc'hez Vari ...
O-daou. (o kanañ kantik ar Follgoad).
Patronez dous ar Follgoad,
Hor mamm hag hon Itron
An dour en hon daoulagad,
Ni ho ped a galon.

Gwall ziroll eo an avel,
Tan ha kurun a ra,
Harpit Bro-Vreizh a-bell
Hag an Dukez Anna !

EIL TAOLENN.

(an hervelep re ha Seza.)

Seza. -- Petra ' o'hoari ga neoc'h 'ta ? Kanañ meuleudi Itron Varia ar Follgoad ken abred-se ? ... An hini a gan mintin mat
A leñv da noz ervat ...
Daoust 'ta, Ronan, ha n'ho piije ket gwelet an Actrou Chaloni abaoe an oferenn ? Galvet eo bet d'an eskopti, ma'z eo chomet e zijuni war an daol, peadra da leuniañ kof ar c'hi e-pad an de vezh. Ur vezh eo !
Meliav. - D'an eskopti ? a ! A ! Moarvat eo anvet da eskob !
Seza. -- Goupaer ! An Actrou Kerherve a zo beleg a zoujañs Doue, leun a zouster kalon ha gouzisk-bras war ar marc'had : hanter re evit mont da eskob e Bro-'hall, trowalc'h, avat, evit bezañ kuzulier e Roma, e-kichen Hon Tad Santel ar Pab. Te, Ronan, a garfe mont gantañ, divroad, evel mevel ?
Ronan. - Eskob, ma plij da Zoue ha dezhañ ! Va mestr a garan, anat eo. Koulskoude ne heuilhfen ket e roundañ war hentoù an estren. Gwelloc'h ganin chom e Kastell !
Meliav. - Eihan out a feson, Ronan, bras eo da furnezh avat. Kredapl eo ez eo bet galvet evit un dra all gant an Actrou 'n Eskob. Ar merc'hed a ra huñvreoù pitiñ. An Actrou Kerherve eskob ! Seza gaezh, kerzh da aozañ lein e-lec'h chom da raniñ ganeomp.
Seza. -- Ya ! Mont a ran diouzhtu. Ha te, kloc'her pikouza, bale da fiou - ran da verc'hed...
Meliav. - Petra ' lavarez ?
Seza. -- Gwelet out bet, en deiz all, o pokat d'ar c'hloier. Evel-se e kred an dud e kollez da spered.
Meliav. - Buanoc'h er-maez, pe ez sy ar c'hantolor-mañ war da benn ! teod lous !
TEIRVET TAOLENN.
(Ronan, Meliav, ha mouezh Seza er-maez)
Ronan. -- Aet eo gant ar foeltr : Scubenn ar poulondig he devo blaz ar put. An Actrou a vo leun a imor fall e-pad an deiz, en desped dezhañ da vezañ bet anvet da eskob gant Seza gozh ! C'hoarzhiañ a rankan !
Meliav. - Na c'hoarzh ket gant an rak gouelañ emberr.
Ronan. - Adarre, Meliav, al labous du o tont en ho kalon ! an amzer a zo kaer, an evned a gan, ar vleunienn a vazalm, da vihanañ...
Meliav. - Ha Breizh n'eo ken Breizh !
Ronan. - Petra c'hoazh ! ar bleiz a zebro an oan ha goude se, doan !
Seza. -- (er-maez) Ronan ! Ronan !
Ronan. - Distro an Actrou ! Emañ er goudor ...
Meliav. - Mat ! Deiz mat dezhañ, d'an eskob nevez. (Ronan a vourc'hoarzh)

P'EDERVET TAOLENN.

(Meliav, Ronan hag an no. Kerherve).

Kerher- Perak e c'hoarzhit ho-taou, marmouzed ma'z oc'h ? Gortozit a-raok diskanañ. Ur seurt tra ! zo c'hoarvezet, Meliav..Dont a ran a-berzh an eskopti da c'hourc'hemenn deoc'h brallañ holl gleier an tour da greisteiz en enor da....

Meliav- (outañ e-unan) Daoust hag e vije kement-se evit an eskob nevez ?

Kerher- Tud e-leizh a zo tro-war-dro aze...

Meliav ha Ronan - (e sellout er-maez) Ar beskont a zo bet tad a-nevez ?

Kerher- Nann !

Ronan- An tan a zo e kêr ?

Kerher- Nann ! ...Breizh, evel ur berlezenn, a zo bet stage evit etav ouzh karunenn Vro-C'hall.

Meliav- Boullc'hurun !

Ronan- Lonket eo bet an oan gant ar bleiz !

Meliav- Ar ger reizh a zo ganit, Ronan....Graet e vo, aotrou Chaloni, hervez ho kourc'hemenn. Koulskoude, va c'hredit start, ne vo ket graet a galon vat.

Kerher- Gra da zever, Meliav. Savet e vo dit goude ur podad sistr hag un tamm anduilh war bara segal.

Meliav- Dale'hit anezho ! Meliav ne vez ket diwar boued en drubarded; diwar boued al lealded ne lavaran ket 'vat.

Kerher- Meliav ! Meliav ! Petra ' glaskez aze ? Ya, gwir eo ! Breizh, an Alarc'h, an Dukez Anna .. Met al lezenn eo al lezen, ha ret eo sentiñ outi.

Meliav- N'anavezan lezenn nemet hini Doue. Petra ' c'houlennit diganin ? Me, Meliav, ar c'hloc'her, mab bihan da Yann Ar Stourmer mervet dindan banniel Yann Vreizh, mab da Glaoda an tabouliner bet en heriu e servij an Dukez e verc'h. Me, Meliav, mac'hagnet - sellit ouzh va jod faoutet gant ur c'kleze gall e Sant Albin an Hilibereana, n'eus ket pell c'hoazh - hag e teuit, bremañ ma testa ouzhin eur ur goañv, da c'houlenn diganin sentiñ glaz va bro ! Nann ! Nann !

Bepred leal da Vreizh,
Biken trubard d'ar Feiz !

PEMPVET TAOLENN.

(Holl vant Goulc'hen ouzhpenn)

Goulc- (a wichen an nor) Meliav ! An Itron a Gêlvarker a c'houlenn diganit mont war-dru Rosko evit...

Meliav- Ya, Goulc'hen, Ya. Anaout a ran aze troioù-kamm an dud iskie. Chom a ran amañ. Lavar d'an Itron ez in goude lein...Evit bremañ e chomen e tour Kreiz-kêr, tost d'ar c'hleier, va merc'hedigou, hervez komzou Seza ar c'hlaousserez.

Goulc- Evel ma kari !

Meliav- Nann ! W'eo ket hiziv e tec'hin ! Kanit, kleier an Iliz-Veur ! Ken, kloc'h bihan Sant Pêr ! Kanit holl gleier Kastell tro-war-dro ! Me, Meliav, a lavar un dra sur : kleier tour Kreiz-kêr a chomo mut dre c'hras Doue, ar Werc'hez Vari ha Sant Pol benniget.

Kerher- Petra ' lavarez, Meliav ? Gwazed a-walc'h a zo e kêr: Goulc'hen amañ, Ronan aze, ha meur a hini all a zo gouest d'ober o zamm labour..

Meliav- Labour Judaz ! evit tregont diner !

Ronan- Evit ma c'helo-me, Meliav, ne vo graet netra. Me ivez a gar va Bro !

Goulc- Ne rin ket muioc'h, aotrou Kerherve !

Seza - Va zeod a vez flemmus a-wechoù; evelato n'eo ket binrus. Ne rin ha ne lavarin netra !

Kerher- Va mignoned ! Grit hervez ho kalon ! Doue a zo ganeomp.

Goulc- Kreisteiz nemet pemp. Selaout kleier Plouenan.
(Klervet e vez ar c'hloc'h ar pellder)

Ronan- Ha hini Karanteg dreist d'ar mor !

Seza - Hini Mespaol, dreist d'al lenneier !

Kerher- Re Bradkoum, Enez-Vaz ha Rosko dre hent Kerc'hoant, Keristal ha Kerien...

Goulc- Ha tostoc'h hini bihan Sant Pêr; hini ar re varv...Doue da bardono d'an Anson ! ...Selaout kloc'h bras an Iliz-Veur.; Kalz a drouz a ra ar c'hleier gwitibunan.

Meliav- Mat ! Va zud keizh ! D'am zro bremañ. Santez Anna, Sant Breizh deuit d'am skoaziañ.

(Meliav a va kuit war-dri kambr ar c'hleier. ...E-lec'h sentiñ,
e chom ar c'hleier mut. .. Ronan ha Goulc'hen a va war o farloc'hoù war-du ar gambr.)

Ronan- Netra, ne welan netra !

Goulc- Leun a boultr !

Seza - Burzhud !

Kerher- Biz Doue !

Ronan - Na kloc'her, na kleier !

Seza - Dre c'halloud Doue ez eo pignet Meliav d'ar Baradoz war eskell er c'hleier.

Kerher- Aleshont e tiskenno un devezh bennak, an deiz ma tiredo Arthur da adnevesiñ Breizh !

Holl - (a-gevret) Gloar da Zoue ha bevet Breizh !

miz ebril 1957.

A N D E N P I N V I D I K,

gant J.D.MILLER, eus Nantyffylon e Maesteg;
nozhet diwar ar C'hembraeg gant Jil Ewan,
gant aotre an oberour.

C'hoarierien: Markiz Kraban Ab Gall, mestr Kastell ar C'hrahanoù.

Yann, mevel.
Erwan, mevel.
ar mezeg.
an Divinour, sorsar ar c'hastell.
Pifig ha
Poufig, eus Bro ar Gornandoned.

Al lec'h : Stignoù a zo tro-war-dro d'ar sal ha war an dorn dehou e
weler ur savadenn goad gant diri da bignat warni. War ar
savadenn : ur gador vras ha pallennoù. A-raok ma tigor ar
ouel e klevet un doare muzik kornandoned. Pa vez ar sonerezh
o vervel, e saver ar ouel ha raktal e kroger gant un ton -
bale brezel - "An Alarc'h" da skouer - hag e weler o tont
war al leurenn, diwar an tu kleiz, Yann, ar mevel. War e
lerc'h, Mar kiz Ab Gall hag Erwan, ar mevel all. An den
bale'h eo ar markiz ha gwisket eo ken kaer hag ur rous.
Tostaat a reont ouz ar savadenn; Yann a chom war an tu dehou,
hag Erwan war an tu kleiz an ur zerc'hel dorn ar markiz ken
na vo aet war e dorn. Neuze e van an daou vevel evel peñsiot
a bep tu d'ar gador.

o o o o o
o o o
o

Markiz-Piv eo pinvidikañ den ar c'horn-bro ?

Yann .-En ur huel al) An Aotrou Markiz Kraban Ab Gall !

Markiz-Piv eo ar brasañ den a zo dre ar vro ?

Erwan .-An Aotrou Markiz Kraban Ab Gall !

Markiz-Gant piv emañ ar brasañ teñzor a gaver dre ar vro ?

Yann .- Gant an Aotrou Markiz Kraban Ab Gall !

Markiz- Gant piv emañ ar brasañ berniad arc'hant hag aour ?

Erwan .- Gant an Aotrou Markiz Kraban Ab Gall !

Markiz- Da biv 'vez rentet an enorioù brasañ dre ar vro ?

Yann .- D'an Aotrou Markiz Kraban Ab Gall !

Markiz- Ha piv eo neuze evurusañ den ar barrez ?

Yann hag Erwan (sonn war e zred) An Aotrou Markiz Kraban Ab Gall !

(Klevet e vez ur c'hilhog o kanañ)

Markiz- Ur c'hilhog o kanañ d'an abardaez ? Peseurt a c'hoari gantañ ?

- 36 -

Yann .- An Ankou ! Aotrou Markiz Kastell ar C'hrahanoù !
(ar c'hilhog a gen adarre)

Markiz- An Ankou ? Piv ' zo neuze o vont da vervel ?

Erwan .- Ur marv bennak a vo kent na vo aet an heol da guzh, Aotrou Mar-
kiz Kastell ar C'hrahanoù !

(Ar stignoù a zifor e foñs al leurenn ha daou gornandoned a zeu-tre
gwisket benn-ja-benn gant bep a justenn ruz-tan hag un toz bezek.
Unan anezho a zo ur vantell hir war e dro hag egile unan verr. He-
dek a reont etrezek an tron ha chom hep fiñval war an tu kleiz.)

Markiz- Piv oc'h-c'hwi ho-taou, estrañjourien ?

Pifig .- Me ? Ac'hanta, Pifig ! (sonn war e dreid)

Poufig- Ha me, Poufig ! (id)

Pifig .- An heol a zo izel.

Poufig- Ha dija eo ruz an eabl.

Pifig .- Emañ ar c'hilhog o paouez kanañ .

Poufig- Ur wech ! Div wech ! Teir gwech !

Markiz- Perak emañ ar c'hilhog o kanañ ?

Pifig .- An Ankou e-barzh ar barrez !

Poufig- Ur marv bennak kent na vo aet an heol da gousket .

Markiz- Met piv eta ' zo o vont da vervel ?

Pifig .- Pinvidikañ den ar barrez.

Poufig- An hini 'mañ gantañ brasañ teñzor ar barrez.

(hag i o treiñ war o seulioù, reut o c'horf ha da vale war al
leurenn evel daou scudard. Distreiñ a reont d'al lec'h m'edont
en arsoù.)

Pifig .- An den pinvidikañ !

Poufig- Haziv, kent na vo aet an heol da gludañ !

(Hag i kuit)

Markiz- Piv ? ...Piv an diaoul eo an daou gañfard-se ?

Yann .- Daou o tont eus ar bed all

Erwan .- O tont eus bro ar gornandoned.

Markiz- Mot arsa ! Me eo pinvidikañ den a zo ! Din-me ' vez an enorioù
brasañ ha me eo mestr ar barrez !

Yann .- Ye ! C'hwi an hini brasañ, Aotrou Markiz Kastell ar C'hrahanoù !

Markiz- Ac'hanta ya ! Me ar hini brasañ ha tre se, me neuze eo a rank
mervel penoz ?

(Bale a ra war al leurenn, prederiet-holl, distreiñ war an tron
ha kuzekañ war e gador evel ur sac'had patatez tra m'emañ Yann
hag Erwan o rimañ e zecorn dezhañ hag o fistoulat war e dro)

- 37 -

Yann.- Aotrou Markiz Kastell ar C'hrabanou o vont da vervel fenoz ?
Santez Anna Wened !

Markiz- (o sevel trumm) Serr da c'henou ! Ar medisin ! Ar mezeg !

Yann.- Ar medisin ! Ar mezeg ! (mont a ra kuit)

Markiz- An apotiker ! Louzou !

Erwan- An apotiker ! Louzou ! (id.)

(Yann a zistro gant ar mezeg ; herr ' zo warno)

Mezeg- Petra ' zo ? Petra ' zo ? Aotrou Markiz ker !

Markiz- An divinour ! Sorser ar c'hastell !

Yann.- An divinour ! Sorser ar c'hastell ! (mont a ra kuit)

Markiz- O vont da vervel, me, kent na vo set an heol da gousket ? Me,
pinvidikañ den ar barrez, ar c'hornad, ar vro ? O gwero'hez
Vari !

Erwan.- (O terekek gant ur voestad traoù) Al louzou ! Al louzou !

Mezeg- (O kemer ur vuredenn hag ul loa eus ar voest ha goude fennañ
ur bannac'h louzou...)

Sed amañ, Aotrou Markiz !

Yann.- (o tont en-dro) An divinour ! sorser ar c'hastell !

Divin- (gwisket gant ur vantell hir, un tog uhel war e benn hag ur
walenn-hud en e zorn).

Petra ' zo ? Petra ' zo ?

Markiz- Fenoz e rankan mervel, me, brasañ den ar barrez !

Divin- Nann 'ta, Aotrou Markiz, nann !

(Gant e walenn-hud e ra neuze ur bern ardoù en-dro da benn ar
Markiz en ur zistagañ frazennoù kevrinus ha goapas evel :)
Krabanoù kozh kranked ! .. Ki ha Kazh !.. Kraban Kastell ar
C'hrabanou !..

Markiz- An heol ! an heol ! (Yann hag Erwan o tec'hel kuit hag o tis-
treiñ raktal).

Yann.- An heol o vont da gousket, Aotrou Markiz !

Markiz- A !...Mervel a ran ! (Ar mezeg a ginnig louzou dezhañ hag ar
sorser a youc'h herrdañ m'hall e frazennoù-hud)

Erwan- Ur vunutenn c'hoazh ha e vo kludet an heol !

Markiz- A ! ...Me o vervel ! ...Ya, me...Allas din !

(Klouc'h an iliz a son ar glaz. Pep hini a van da selaou hep ran-
dañ grik ken na vo tavet ar c'hloc'h.)

(en ur huanadiñ) Marv on ! (an holl e chom da sellout outañ.)

Mezeg- Nann ! N'oc'h ket c'hoazh ! (Pifig a ra ar Markiz ken na
donn dirantañ ur yudadenn skiltrug).

Divin- Nann, Aotrou Markiz ker, n'oc'h ket merv c'hoazh ! (Gant e wa-
lenn e ro dezhañ fest ar vach ken na ra dezhañ nijal diwar e
gandor ha blejal evel ul leuz).

Markiz- N'on ket merv c'hoazh ? N'on ket merv ?

Holl.- Nann ! n'oc'h ket merv c'hoazh ! Aotrou Markiz Kastell ar C'hraba-
nau !

(Pifig ha Poufig a zeu war al leurenn hag a chom reut evel
daou beul).

Markiz- A ! Setu an daou gaffard !

Pifig- Emañ pinvidikañ den ar barrez o paouez mervel !

Poufig- O paouez mervel...kent d'an heol mont da guzh !

Markiz- Met, n'on ket merv-me ?

Pifig- Emañ evuruseñ den ar barrez o paouez mervel !

Poufig- O paouez mervel... 'vit 'n abardaez !

Markiz- Met c'hwistim hag-eñ n'eo ket me brasañ den ar barrez, evuru-
sañ hini ha pinvidikañ hini a zo ?

Pifig.- O nann ! Ur paour-kaezh klasker-bara, kozh ha dall an hini a zo
merv !

Poufig- Ur paour-kaezh kozh hag a oa en e goaez war ribl an hent, gwis-
ket gant truilhoù, setu piv a zo merv .

Pifig- Setu piv ' oa an evuruseñ er barrez !

Poufig- Hag an hini pinvidikañ ! (An daou baotrig a va neuze war-raok
gant o mantilli troiset war o divskoaz kleiz).

Markiz- Ur c'hasker-bara ? Pehini neuze ?

Yann.- ac'hanta hennezh hag a oa o vevañ en un ti-plouz drek ar
C'hastell, Aotrou Markiz .

Erwan.- Hep kar na par .

Markiz- Mar demañ kont evel-se, hag eñ ken pinvidik-se, ac'hanta, n'eo
nemet un toueller hag ur gaouiad. Añc'hañ ! Un teñzor a zo
gentañ en e siklud ? Ma ! ain-me, Markiz Kastell ar C'hraba-
nou, e vo an teñzor-se neuze ha da zen all ebet . Kit buan da
furchal an ti !

(Yann hag Erwan a va herrdañ m'hellont.)

Mezeg- Ur bannac'h louzou bennak a fell daoc'h kaout c'hoazh, Aotrou
Markiz ?

Markiz- Gogez ! Daoust hag-eñ un den kreñv evel don-me en deus ezhoñ
a louzou ? Skarz ac'hann gant da loustoni !

(Ar mezeg a sonna dirzañ hag a va kuit).

Divin- Ha me, Aotrou Markiz, Na gellout a ran ivez ober tra pe dra
evidoc'h gant ar walenn-mañ ?

Markiz- Seurt ebet ! Kerh ac'hann, te ivez, gant da walenn an diaoul !
(Tec'hel a ra kuit. Ar Markiz, pouner e benn, a va da gazañ.
Kerkent e weler Yann hag Erwan o tont war al leurenn ; en e anv
a chomont dirak ar Markiz.)

Markiz- Ac'hanta ! Pelec'h emañ an teñzor ?
Yann .- N'eus teñzor ebet, Motrou Markiz .
Erwan- N'eus mann eno nemet ur vatarasenn-blouz, ur c'hozh penn-wele,
graet gant broenn sec'h.
Yann .- N'eus eno na boued, na tan, na dilhad, na netra.
Erwan- Ha setu perak eo bet mervet ar paour-koezh kozh gant ar riv
hag an naon .
Markiz- Arsa !...Daoust hag-efi n'o deus ket kontet an daou gañfard
fall-se din bremaik e tlee pinvidikañ den ar barrez mervel
fenezh ? Na bouzer e oan pe ne oan ket ?
(Pifig ha Poufig o tont-tre hag o chom sonn dirak ar Markiz
goude bezañ tostaet outañ.)
Pifig- Trist eo bevañ war an douar fenezh .
Poufig- Ar bed holl a zo trist.
Pifig- Marv eo an den pinvidikañ.
Poufig- Marv eo an hini evurusañ ' oa.
Pifig- En e galon e oa e deñzor.
Poufig- En e greiz e oa e holl binvidigezh.
Markiz- (O sevel ha mont diwar al leurenn, izel e galon, en ul leva-
rout outañ e-unan !)
En e galon e oa e deñzor,
En e greiz e oa e holl binvidigezh...
He me an hini pinvidikañ e gwirionez,
Setu-me bremañ paoureañ hini a zo war an douar...
(Bez' e klevet " Largo" Haendel tra ma kouezh ar ouel).

Dis'klariet hervez lezenn : eil trimiziad 1964.
Dépôt légal : deuxième trimestre 1964.

Directeur-Imprimeur-Gérant : Armand LE CALVEZ, Crec'h-Avel,
Hener- Moular - Merour : LANNION. Côtes d' Armor.
Périodique inscrit à la C.P.P.P. sous le numéro 35 323.

T A O L E N N .

Ar C'hoariva er Skol, gant Armañs Ar C'halvez pejenn I
Grit ho C'hoariva Merc'hodannoù, gant R.Hemon IV



Deiz Kentañ ar Skol, gant Erwan Kervella	1
Mont-Dont d'al Loar, gant Erwan Kervella	4
Ar C'hloc'her hag an Diaoul, gant ar Gontez de Rohan-Chabot	8
Eured al Logodenn, gant Youenn An Olier	11
Pêrig ha Gwignolig, gant Roparz Hemon	14
An Daou Dort, gant E.Galbrun	16
An Eteu Nedeleg, gant B.F.	19
A' Leue Acour, gant Dinaiç	24
Bur-hud ar C'hloc'hdi, gant Yann ar C'harv	32
An Den Pinvidik, gant J.D.Miller, troet gant Jil Ewan	56

Pep gwir miret strizh gant SKOL.

Evit kacout an aotre da c'hoari ar pezhioù
se, e vezer pedet da skrivañ da SKOL.

LEVRIOU E GWERZH E TI " SKOL " .

Pedtr e Varv Glas	3 lur	An Ti Satanazet	4 lur
Merc'hig ar Rozenn	3	Alanig an Tri Roue	4
(diviet e ti an embanner)		Iommig	3,50
Robinson Kruzo	1,50	C'hoariva Brezhonek	4 lur
Ar Goantenn e Koad ar C'houskl	1,50	Labous Ar Wirionez	4 lur
Ar C'hazh gant e Heuzoù ler	1,50	Mervailhoù ar Vreton.	3 lur
Luduennig	1,50	Notennoù d.w. ar	
Kabellig Ruz	1,50	Gelted	8 lur
Gwenn-Erc'h hag ar Seizh	1,50	L'Abbé P.M.Lec'hvien	5 lur
Kispirenn	2 lur	L'Abbé J.M.Perrot	5 lur
Gwennig ha Gwenola	2 lur	La Roche et ses Envi-	
Mojennoù	2 lur	rons gt E.Ar Barzi.	5 lur
Korc'hen Azen	2 lur		
Ar C'havr hag he givri	2 lur	<u>Lakaat 10 % ouzhpenn evit</u>	
Istor ar Mabig Jezuz	2 lur	<u>ar mizoù.</u>	

LENNIT E BREZHONEG KAERAN LEVR AR BEDAR BIBL.

Aviel Sant Mazhe	4,50 lur	Levr ar Furnez	3 lur
Aviel Sant Mark	4	Koheleth	2
Aviel Sant Yann	4	Hebarkouk, Hobdia	3
Dietañliadur Sant Yann	3	Al Lizheroù Katolik	3,50

Kas an arc'hant d'an Dll Saint Gall de Pons, LOUANNEC, Côtes du Nord.
K.R.P. Rennes 519 40.

LEVRAOUEG v-BARR-HEOL

Seurez Kerwenan, gant Dom Duchauchix	3,50
Mervel da vevañ, gant Y.F.Ar Gow	4,50
Otello, gant Shakespeare, Lakaet e Brezhoneg gant Klerg	5,00

Nevez embannet gant STUDI HAG OBER ha BARR-HEOL :

SANT LUKAZ, troet gant Klerg 4,00

K.R.P. Barr-Heol : Abbé Le Clerc, Buhilien, 91 764 Rennes.

UN NEVEZINTI : S T U D I H A G O B E R adembannet...

4 c'haier : 10 lur da gas d'ar Dll Saint Gall.

Niverenn gentañ : An Aviel Santel Hervez Lukaz, troet gant Klerg.
(e gwerzh ivez e ti reier Barr-Heol)

LENNIT BEP MIZ A R B E D K E L T I E K

Koumanant-bloaz : 10 lur, da gas d'Ar Bed Keltiek, BREST,
K.R.P. Rennes 1907 07.